

J. Le Du - Y. Le Berre

**DICTIONNAIRE PRATIQUE
FRANÇAIS - BRETON**

III. Chandelle – Cygne

STUDI N° 12

Gouere/Juillet 1979

Section de Celtique
Faculté des Lettres de Brest
Université de Bretagne Occidentale

J. Le Du - Y. Le Berre

**DICTIONNAIRE PRATIQUE
FRANÇAIS - BRETON**

III. Chandelle – Cygne

STUDI N° 12

Gouere/Juillet 1979

Section de Celtique
Faculté des Lettres de Brest
Université de Bretagne Occidentale

STUDI

est publié sous l'autorité de
la SECTION DE CELTIQUE
de la Faculté des Lettres et Sciences Sociales de Brest

avec le concours du
CENTRE DE RECHERCHE BRETONNE ET CELTIQUE
et de
l'UNIVERSITE DE BRETAGNE OCCIDENTALE

Imprimé et diffusé par le
C.R.D.P. de l'ACADEMIE DE RENNES
Centre Régional de Documentation Pédagogique

LES ADRESSES CONCERNANT "STUDI"

RESPONSABILITE SCIENTIFIQUE

M. Jean LE DU et Yves LE BERRE

FACULTE DES LETTRES ET SCIENCES SOCIALES

20, avenue Victor Le Gorgeu
BP 860 . 29279 BREST Cédex

Tél. (98) 03.06.87

IMPRESSION - DIFFUSION - ABONNEMENTS

C. R. D. P.

92, rue d'Antrain
BP 158 . 35003 RENNES Cédex

Tél. (99) 36.05.76

C.C.P. 9404-75 C RENNES

P R I X

Abonnement pour 4 numéros consécutifs (1 an)

30 F

- chandelle 1) kantell f. -ou cf. bougie
il brûle la chandelle par les deux bouts : hennez a zev ar gantell dre an daou benn.
2) /divers/
j'en ai vu trente-six chandelles : trelled eo bed ma daoulagad.
- changeant le temps est changeant : derhel a ra an amzer da chañch.
- changement chañchamant m. chañchamañchou
il y a du changement : chañchamant zo.
changement de temps : chañchamant amzer.
- changer 1) chañch (chañch-)
changer de côté : chañch tu.
changer de place : chañch plas.
changer d'air : chañch ér.
changer d'adresse : chañch ti.
changer de métier : chañch micher.
changer de vêtements : chañch dillad.
change de chemise ! : chañch da roched !
changer de l'argent à la banque : chañch arhant barz ar bank.
changer d'itinéraire : chañch roud.
changer de conversation : chañch kôz.
changer les draps du lit : chañch ar liñseliou war ar quele.
quand il m'a vu, il a changé de tête : chañched e-neus penn p'e-neus gweled ahanon.
changer de voiture : chañch e wetur.
il faudra changer de train à Rennes : red e vo chañch treñ barz Roazon.
qu'est-ce qu'il a changé ! : chañched eo, 'vad !
il a changé de ton : chañched e-neus e stumm da gôzeal.
il a changé d'attitude : chañched e-neus e zoare.
changer de forme : chañch stumm.
changer de couleur : chañch liou.
tout change : chañch a ra peb tra.
changer d'idée : chañch ide.
le vent a changé : an avel e-neus chañched roud.
et maintenant, pour changer, je vais vous raconter une histoire : ha bremañ, kement ha chañch, e kontin eun istor deoh.
le gouvernement change tout le temps : derhel a ra ar gouarnamant da chañch.
il a changé du tout au tout : chañched eo penn-da-benn.
2) /divers/
il n'a pas changé du tout : n'eus tamm chañchamant bed ennañ.
sans rien changer : heb tamm chañchamant bed.
le monde a changé : chañchamant zo barz ar bed.
il change toujours d'avis : hennez zo lar-dizlar.
- changer (se) 1) chañch (chañch-) dillad /vêtements/
allez vous changer ! : kerzit da chañch ho tillad.
je n'ai pas encore eu le temps de me changer : n'am-eus ked bed amzer da chañch ma dillad hoaz.

2) trei (tro-) ; troi (tro-) en
l'eau se change en glace : trei a ra an dour e skorn.

chanoine	chaloni m. -ed le chanoine Le Roux : An otrou Chaloni Roux.
chanson	1) sonenn f. -ou ; son f. -iou ; kanaouenn f. -ou /traditionnel/ une belle chanson : eur zonenn vrao. une vieille chanson : eur zonenn goz. cette chanson est trop longue : re hir eo ar zonenn-ze. une chanson nouvelle : eur zon nevez saved. une chanson triste (gaie) : eur ganaouenn drist (laouen). une chanson amusante : eur zonenn farsuz. une chanson d'amour : eur zonenn a garantez. une chanson de noce : eur zon a eured. une chanson bretonne : eur ganaouenn vrezonég /en langue bretonne/ composer une chanson : sevel eur ganaouenn. apprendre une chanson : deski eur zonenn. chanter une chanson : kana eur zon. oublier les paroles d'une chanson : dizoñjal pozioù (komzou, gerioù) eur zon. l'air de la chanson : ton ar ganaouenn. un cahier de chansons : eur haier kanaouennou. un livre de chansons : eul levr kanaouennou. le début (la fin) d'une chanson : komañsamant (fin) eur ganaouenn. c'est ma mère qui m'a appris cette chanson : gand ma mamm am-eus desked ar zonenn-mañ. chanter une chanson sur un air connu : kana eur ganaouenn war eun ton anavezad. cette vieille femme connaît beaucoup de chansons : ar vaouez knz-se a oar eur bern kanaouennou. 2) chançon f. -iou elle écoute des chansons à la radio toute la journée : pad an deiz e vez o chillaou chançonioù barz ar radio.
chant	1) kan m. cf. chanson le chant des oiseaux : kan an evned ; kan al laboused. le chant du coq : kan ar hog ; kan ar hillog. 2) /côté/ kostez m. -iou ; koste m. -iou les triques du mur sont posées de chant : laked eo bed brikennou ar voger war o hostezioù.
chantepleur	kog m. la chantepleur de la barrique : kog ar varrikenn.
chanter	1) kana (ka-) il chante bien /correctement/ : hennez a gan mad. elle chante bien /d'une manière agréable/ : honnez a gan brao. il chante trop haut (bas) : re uhel (izel) e kan. chanter à tue-tête : kana a bouez penn ; kana a bouez e benn. chanter doucement : kana a vouez izel. il chan e zil : ne gan ked brao.

il chante faux : ne gan ked just.
chantons en chœur : kanom toud asamblez.
les oiseaux chantent : 'ma al laboused o kana.
chanter les louanges de quelqu'un : kana meuleudiu unan-bennag.

2) /divers/
il chante toujours la même chanson : ar memez ton a vez gantañ bepred.
si ça vous chante ! : mar plij ganeoh !

chanteur	kaner m. -ien un bon chanteur : eur haner mad. un vieux chanteur : eur haner koz. un chanteur réputé : eur haner bruded. un chanteur connu : eur haner anavezad.
chanteuse	kanerez f. -ed cf. chanteur
chantier	chantier m. -ou ; santier m. -ou un grand chantier : eur chantier braz. un nouveau chantier : eur chantier nevez. il travaille sur les chantiers : labourad a ra war ar chantierou. les ouvriers du chantier : ouvrierien ar chantier.
chantonner	mouskana (mouskan-)
chanvre	kanab m. semier du chanvre : hada kanab. broyer le chanvre : brêa ar hanab. rouir le chanvre : eoga ar hanab. teiller le chanvre : tilla ar hanab. filer du chanvre : neza kanab ; nea kanab. tisser du chanvre : gwia kanab. une pièce de toile de chanvre : eur pez l'fen kanab. une corde de chanvre : eur gordenn ganab.
chapeau	tok m. -ou, -eier ; tog m. -ou un chapeau de paille : eun tok plouz. un chapeau breton /traditionnel/ : eun tok voulouz. cf. casquette.
chapelet	chapeled m. -ou un chapelet en bois : eur chapeled koad. un chapelet d'ivoire : eur chapeled olifant. dire un chapelet : lared eur chapeled.
chapelier	il est chapelier : hennez a ra tokou /fabricant/ hennez a werz tokou /marchand/
chapelle	chapel f. -iou une petite chapelle : eur chapel vihan. une vieille chapelle : eur chapel goz.

restaurer une chapelle : rapari eur chapel.
 la chapelle de la Sainte-Vierge : chapel ar Werhez.
 le pardon de la chapelle St-Pierre : pardon chapel Kerber.
 le clocher de la chapelle : tour ar chapel.

chapitre	pennad m. -ou /livre/ lisez le deuxième chapitre : lennit an eil pennad. le premier (dernier) chapitre : ar pennad kenta (diweza). le deuxième chapitre : an eil pennad.
chaque	1) peb chaque personne : peb den cf. chacun. chaque chose : peb tra. chaque pays : peb bro. 2) beb /dans les locutions de temps/ chaque fois : beb tro ; beb gwech. à chaque instant : da beb mare ; bepred. chaque mois : beb miz. chaque semaine : beb sizun ; beb sun. chaque année : beb bloaz. 3) /divers/ chaque jour : bemdez ; bemde. chaque nuit : bemnoz ; beb noz.
char	1) /militaire/ cf. tank 2) /désuet/ cf. camion 3) char à bancs : char-bañ m. char-bañiou
charabia	sōznaj m. ; gregach
charançon	/insecte/ kosenn f. kosed
charbon	1) glaou m. le charbon est noir : du eo ar glaou. du charbon de terre : glaou douar. du charbon de bois : glaou koad. brûler du charbon : devi glaou. vendre du charbon : gwerza glaou. aller chercher un seau de charbon : mond da gerhad eur zaillad glaou. un sac de charbon : eur zahad glaou. un marchand de charbon : eur marhadour glaou. un tas de charbon : eur bern glaou. 2) glaouenn f. glaou un morceau de charbon : eur hlaouenn. un charbon ardent : eur hlaouenn veo ; eur hlaouenn ru ; eur hlaouenn dan. 3) /maladie du blé/ skod m. ; luhed m.
charbonnier	1) glaouer m. -ien /désuet/ 2) marhadour glaou.

charcuterie	1) /commerce/ charkutiri f. -ou 2) /cochonaille/ killevardon m.
charcutier	charkutier m. -ien
chardon	askolenn f. askol un champ plein de chardons : eur park goloed a askol. arracher un pied de chardon : tenna eun askolenn.
chardonneret	pabor m. -ed un nid de chardonneret : eun neiz pabor.
charge	1) karg f. -ou le notaire a abandonné sa charge : dilezed e-neus an noter e garg. cinq enfants, c'est une lourde charge : pemp a vugale a zo eur gwall-garg. les frais sont à la charge du fermier : ar frêjou zo e karg ar fermier. prendre en charge : kemer en e garg. 2) samm m. -ou une lourde charge : eur zamm ponner. porter une charge sur l'épaule (le dos) : dougen eur zamm war e skoaz (e chouk). répartir la charge entre plusieurs : ingala ar garg tre meur a hini. 3) /divers/ la charge d'une brouette : eur garrigellad. une charge de bois /portée sur le dos/ : eur choukad koad cf. cargaison, chargement.
chargé	1) karged un des domestiques est chargé de fermer les portes le soir : unan dez ar vevelien a zo karged da brenna an doreziou diouz an noz. le navire est chargé : karged eo ar vatimant. le fusil n'est pas chargé : n'eo ked karged ar fuzuill. 2) sammad sept mules chargées d'or et d'argent : seiz mul sammad a aour hag a arhant. le facteur est chargé de lourds paquets : sammad eo ar fakteur a bakajou ponner. 3) behied ; groned les arbres sont chargés de fruits : behied eo ar gwez gand ar frouez. 4) /divers/ il a la langue chargée : touz eo e deod. j'ai l'estomac chargé : stambouhed on.

chargement	1) cf. charge, cargaison. 2) le chargement du camion n'est pas encore terminé : n'eo ked peurgarged hoaz ar hamion. il est interdit de fumer pendant le chargement : divenned eo butunad keit ha m'emaer o karga.
charger	1) karga (karg-) charger un camion : karga eur hamion. charger un bateau : karga eur vatimant. charger un fusil : karga eur fuzuill. je l'ai chargé de faire ce travail : karged am-eus anezañ da ober al labour-ze. 2) samma (samm-) charger un cheval : samma eur marh. charger un mulet : samma eur mul. charger un âne : samma eun azenn. 3) /divers/ le taureau l'a chargée : ed eo ar hole dezi. cf. attaquer. cette bouillie charge l'estomac : stambouhuz eo ar yod-se.
chariot	cf. char, charrette.
charitable	karantezuz.
charité	1) karantez f. -iou ; karante f. -iou la charité chrétienne : ar garantez kristen. la foi, l'espérance et la charité : ar feiz, an esperañs hag ar garantez. la charité envers son prochain : ar garantez vid e nesa. 2) cf. aumône.
charivari	1) charivari m. ; chalvari m. /folklore/ 2) cf. tapage.
charmant	cf. agréable, aimable, beau.
charme	1) /arbre/ favenn-pud f. fao-pud cf. arbre 2) cf. sort, ensorceler... 3) /divers/ elle a beaucoup de charme : eur plah agreab eo. sa conversation est pleine de charme : eur blijadur eo kôzeal ganti.
charmer	1) cf. e. sorceler 2) cf. plaire.

charnier	1) /saloir/ charnel m. -ou ; kelorn m. -iou ; somur m. -iou il n'y a plus de lard dans le charnier : ne chom tamm kiq-sall bed barz ar charnel. 2) karnel f. -iou /ossuaire/
charnière	mudurun f. -ou les charnières de la porte (de la fenêtre) : mudurunou an nor (ar prenestr).
charogne	gagn f. -ou cela sent la charogne : c'hwez ar hagn zo amañ.
charpente	framm m. ; koad m. ; koataj m. la charpente de la maison : koad an ti ; koataj an ti. le nouveau hangar a une charpente en fer : an angar nevez e-neus eur framm houarn. on a posé la charpente de la maison : éd eo ar hoad war an ti.
charpentier	kalvez m. kilvizien ; kalve m. kilvizien ; charpentier m. -ien
charpie	pillou pl. il a mis ses vêtements en charpie : laked e-neus e zillad en pillou.
charretée	karrad m. -ou une charretée de foin : eur harrad foen. une charretée de trèfle : eur harrad melchon.
charretier	chareter m. -ien ; chareteur m. -ien le fouet du charretier : skourjez (foet) ar chareter.
charrette	1) karr m. kirri une grande (petite) charrette : eur harr braz (bihan). une vieille charrette : eur harr koz. une charrette en bois : eur harr koad. attelle le cheval à la charrette ! : stag ar marh ouz ar harr ! conduire une charrette : kas eur harr. charger (décharger) une charrette : karga (diskarga) eur harr. monter dans la charrette : pignad barz ar harr. sauter de la charrette : ober eul lamm er-méz deuz ar harr. la charrette a versé : chavired eo ar harr. il a été écrasé par une charrette : friked eo bed gand eur harr. les roues de la charrette : rojou ar harr. l'essieu de la charrette : abel ar harr. le fond de la charrette : foñs ar harr ; leur ar harr. les brancards de la charrette : breñiou ar harr. les côtés de la charrette : kosteziou ar harr. la ridelle de la charrette : ridell ar harr. 2) cf. charretée

charroi	charre m. -ou un charroi de pierres : eur charre mein.
charroyer	charread (charre-) ils ont fini de charroyer le fumier : fin o-deus charread an teill.
charrue	arer m. erer ; alar m. eler ; brabant m. brabañchou /selon le type/ une vieille charrue : eun alar koz. travailler à la charrue : labourad gand ar brabant. l'avant-train de la charrue : killorou ar brabant. les roues de la charrue : rojou ar brabant. le soc de la charrue : soh ar brabant. l'âge de la charrue : laz ar brabant. le coutre de la charrue : kontell ar brabant. le versoir de la charrue : skouarn ar brabant. la charrue trace des sillons bien droits : ober a ra an alar irvi eeün.
chas	kraouenn f. ; toull f. le chas d'une aiguille : kraouenn (toull) eun nadoz.
chasse	1) chase m. un chien de chasse : eur hi chase. un permis de chasse : eur permi chase. après l'ouverture de la chasse : pa vez (vo, veze) digor ar chase. pendant la chasse : pad ar chase. après la fermeture de la chasse : pavez (vo, veze) serred ar chase. 2) /divers/ je vais à la chasse tous les dimanches : beb sul eh an da chaseal. aller à la chasse aux canards : mond da chaseal houidi. un fusil de chasse : eur fuzuill. la chienne est en chasse : 'ma ar gîez en tommer.
châsse	boest ar relegou.
chasser	1) chaseal (chase-) chasser le lièvre : chaseal gedon ; gedonna. cf. larin, perdrix, sanglier, souris, etc... 2) kas (kas-) kuit son père l'a chassé de chez lui : kased eo bed kuit deuz ar gêr gand e dad. 3) choual (chou-) ; dichoual (dichou-) chasser les poules de la maison : dichoual ar yer er mēz deuz an ti. 4) cf. jîisser

chasseur	chaseer m. -ien un bon (mauvais) chasseur : eur chaseer mad (fall) un chasseur bredouille : eur chaseer gag. un chasseur de renards : eur chaseer lern. rencontrer un chasseur : nem gavoud gand eur chaseer. les chasseurs disent qu'il n'y a plus de lièvres : hervez ar chaseerien, n'eus ken a hedon.
chassie	pikouz m.
chassieux	pikouz il a les yeux chassieux : daoulagad pikouz e-neus.
chassis	stern m. -iou le chassis de la fenêtre (de la porte) : stern ar prenestr (an nor).
chasuble	kazul f. -iou
chat	1) kaz m. kizier un petit (grand) chat : eur haz bihan (braz). un gros chat : eur haz teo. un chat maigre : eur haz treud. un jeune (vieux) chat : eur haz yaouank (koz). un joli petit chat : eur haz bihan brao. un chat sauvage (domestique) : eur haz gouez (doñv). un chat noir (blanc) : eur haz du (gwenn). un chat gris (roux) : eur haz griz (rouz). le chat est souple : skañv eo ar haz /quand il tombe/ ; wesk eo ar haz /démarche/ trouver un chat : kaoud eur haz. un chat écrasé : eur haz friked. donner un petit chat : rei eur haz bihan. le chat mange un poisson : 'ma ar haz o tebri eur pesk. le chat boit son lait : 'ma ar haz oh eva e lēz. le chat miaule : 'ma ar haz o vinoaual (o viaoual). le chat fait le gros dos : torted eo ar haz ; torta a ra a haz. le chat ronronne : 'ma ar haz o lared e bater (o paterata). le chat bondit : 'ma ar haz o lampad ; ma ar haz o lammad. le chat joue avec une bobine : 'ma ar haz o c'hoari gand eur ganell. le chat m'a griffé : (s)krabised on bed gand ar haz. le chat a attrapé un oiseau : ar haz e-neus taped eul labous. le chat chasse les souris : 'ma ar haz o logota. caresser un chat : floura eur haz. le chat s'étire : 'ma ar haz o tihourda. le chat baille : 'ma ar haz o varaillad (o vazaillad). le chat dort sur les genoux de la petite fille : 'ma ar haz o kousked war varlenn ar plah vihan. le chat est pelotonné près du feu : chouched eo ar haz tal an tan. une portée de chats : eur torrad kizier.

des poils de chat : bleo kaz.
 la fourrure du chat : kreo ar haz.
 la queue du chat : lost ar haz.
 le dos du chat : kein ar haz.
 le chat a mal à la patte : ar haz e-neus poan en e bao.
 la tête du chat : penn ar haz.
 les oreilles du chat : dioukouarn ar haz.
 un peu de chat : eur hrohenh kaz.
 le chat a les yeux brillants dans l'obscurité : lufi eo daoulagad ar haz pa vez tefval.
 le nez du chat : fri ar haz.
 les moustaches du chat : mourennou ar haz.
 les dents du chat sont pointues : lemm eo dent ar haz.
 le menton du chat : chik (groñch) ar haz.
 ce chat est un bon chasseur de souris : eul logotaer mad eo ar haz-se.

2) /divers/

j'ai un chat dans la gorge : raouied on.
 il n'y a pas un chat dehors : n'eus kristen bed war vale.
 il n'y a pas de quoi fouetter un chat : n'eo ked gwall-afer.
 je donne ma langue au chat : boud on.

châtaigne

1) kistinenn f. kistin ; kestenenn f. kesten
 une grosse châtaigne : eur gistinenn vrâz.
 une petite châtaigne : eur gistinenn vihan.
 les châtaignes sont mûres : dareo eo ar histin.
 cette châtaigne est véreuse : eur preñv zo barz ar gistinenn-mañ.
 les châtaignes sont pourries : brein eo ar histin.
 des châtaignes sucrées : kistin dous.
 ramasser des châtaignes : dastum kistin.
 croquer des châtaignes : debri kistin en kriz.
 griller des châtaignes dans l'âtre : grilla kistin war an oaled.
 éplucher des châtaignes : dibluska kistin.
 cuire des châtaignes à l'eau : poaza kistin barz an dour.
 la peau de la châtaigne : pluskenn ar gistinenn.
 des bogues de châtaignes : klos (klor) kistin.
 2) aller chercher des châtaignes : mond da gistina.

châtaignier

gwezenn-gistin f. gwez-kistin cf. arbre
 une allée de châtaigniers : eun ale gwez-kistin.
 une haie /rangée/ de châtaigniers : eur renkennad gwez kistin.

châtain

cette catégorie n'existant pas en breton, cf. blond, brun.

château

1) kastell m. kestell ; kistilli /château-fort/
 un vieux château : eur hastell koz.
 un château en ruines : eur hastell kouezed en e boull.
 le château a été rasé par Richelieu : dismantred eo bed ar hastell gand Richelieu.
 les tours du château : touriou ar hastell.
 la cour du château : porz ar hastell.
 le logis du château : tojeiz ar hastell.

les portes du château : doriou ar hastell.
 les murailles du château : mogeriou ar hastell.
 les fossés du château : douviou ar hastell.

2) maner m. -iou ; /résidence civile/
 un grand château : eur maner braz.
 le seigneur (la dame) du château : Otrou (Itron) ar hastell.
 les habitants du château : tud ar maner.
 le château a été restauré : adsaved eo bed ar hastell.
 nous avons mis 2 heures à visiter le château : diou eur om bed o vizita ar hastell.
 le château a été construit il y a 300 ans : tri hant vloaz zo eo bed saved ar maner.
 le jardinier du château : jardinier ar maner.
 les toits du château : toennou ar maner.
 les écuries du château : marchosiou ar maner.

3) /divers/

ils mènent la vie de château : beva a reont giz ôtrouien.

châtelain

ôtrou m. otronez ; aotrou m. aotrounez, aotrouien
 cf. seigneur, château

chat-huant

kaouenn (-gaz) f. kaouenned (-kaz)

châtier

kastiza (kastiz-) cf. punir

chatière

toull ar haz m.

châton

1) kaz-bihan m. kizier-bihan cf. chat
 2) /d'une bague/ lagadenn f. -ou
 3) /botanique/ bisig m. -ou ; bichig m. -ou

chatouiller

hilliga (hillig-) ; harlinkad (harlink-)
 chatouiller les pieds de quelqu'un : hilliga e dreid da unan bennag.
 arrête, tu me chatouilles ! : paouez 'ta, 'maout o hilliga ahanon.

chatouilleux

il est chatouilleux : henez e-nez harlink ; hillig e-neus.

châtré

1) spaz ; spazed ; spahed
 2) à demi-châtré : rangouill

châtrier

spaza (spaz-) ; spaha (spah-) ; troha (troh-)
 châtrier un cheval : spaza eur marh.
 châtrier un porc : spaza eur pemoh.

châtreur

spazer m. -ien ; spaher m. -ien ; troher m. -ien

chatte	kazez f. -ed cf. chat
chaud	1) tomm il fait chaud : tomm eo. un temps chaud : eun amzer domm. il ne fait pas chaud : n'eo ked tomm. j'ai chaud : tomm eo din ; tomm am-eus. je n'ai pas très chaud : n'am-eus ked re domm. il ne fait pas bien chaud : n'eo ked gwall-domm. il fait très chaud : tomm-tomm (tomm-braz) eo le soleil est chaud, aujourd'hui : tomm eo an heol, hirio. une journée chaude : eun devez tomm. il fait plus chaud aujourd'hui qu'hier : tommoh eo hirio vid ne oa deh. se laver à l'eau chaude : nem walhi gand dour tomm. la queue de la casserole est chaude : tomm eo lost ar gastolorenn. le café est encore chaud : tomm eo ar hafe hoaz. il a le front chaud : tomm eo e dal. mettez des vêtements chauds : gwiskit dillad tomm. il fait chaud comme dans un four : tomm eo vel barz eur 'forn. 2) en tomm ; ez tomm manger (boire) chaud : debri (eva) en tomm. 3) /divers/ pleurer à chaudes larmes : gouela doureg rester au chaud : chom er gêr ; chom en e dommder. cela ne me fait ni chaud ni froid : me n'on ked jened gand kement- se. il est habillé chaudement : dillad tomm zo warnañ.
chaudement	
chaudière	chodierenn f. -ou ; kaoter f. -iou la chaudière de l'alambic : chodierenn al lambik. la chaudière est percée : toull eo ar chodierenn. allumer la chaudière : alumi ar chodierenn. éteindre la chaudière : laha an tan barz ar chodierenn. la chaudière est dans la cave : barz ar hao 'ma ar chodierenn. la chaudière ne marche pas : n'a ked ar chodierenn en dro. la chaudière a éclaté : tarzed eo ar chodierenn.
chaudron	1) potouarn m. -iou ; pofor m. -iou ; kôter f. -iou un grand (petit) chaudron : eur potouarn braz (bihan). mettre le chaudron sur le feu : lakad ar potouarn war an tan. le chaudron est sur le trépied : 'ma ar potouarn war an trebez. le chaudron est pendu à la crémaillère : 'ma ar potouarn a- istribill ouz an drezenn-bod. remplir (vider) un chaudron : karga (diskarga) eur potouarn. nettoyer un chaudron : netaad eur potouarn. le fond du chaudron : fohs ar potouarn. les pieds du chaudron : treid ar potouarn. l'anse du chaudron : kromellenn ar potouarn. les orifices du chaudron : skouarniou ar potouarn.

	2) /chaudronnée/ potouarniad m. -ou ; poferiad m. -iou ; kôteriad f. -ou à eux trois, ils mangeraient un plein chaudron de pommes de terre au lard : 'trezo o zri e tebrfent eur potouarniad patatez ha kig-sall.
chaudronnier	chodronier m. -ien ; miñter m. -ien /désuet/
chauffage	1) un appareil de chauffage : eur mekanik da domma. 2) ils ont un chauffage au bois (au charbon) : tomma a reont o zi gand keuneud (glaou). dans le nord, il faut allumer le chauffage dès le mois de sep- tembre : barz an nord e vez red tomma an t'iez kerkent ha miz gwengolo.
chauffer	1) tomma (tomm-) chauffer de l'eau : tomma dour. mettre du lait à chauffer : lakad lèz da domma. ce four chauffe bien : tomma mad a ra ar 'forn-ze. le soleil chauffe : tomma a ra an heol. ça chauffe ! : tomma a ra ! 2) gori (gor-) chauffer le four : gori ar forn.
chauffer (se)	tomma (tomm-) se chauffer les pieds au feu : tomma e dreid ouz an tan. ils se chauffent encore au bois : tomma reont o zi gand keuneud hoaz.
chauffeur	chofeur m. -ien un bon (mauvais) chauffeur : eur chofeur mad (fall).
chauler	raza (raz-) ; raa (ra-) chauler des arbres : raza gwez.
chaume	soul m. ; plouz m. un toit de chaume : eun doenn zoul ; eun doenn blouz.
chaumière	ti-soul m. tiez-soul ; ti-plouz m. tiez-plouz elle habite dans une chaumière : 'ma o chom barz eun ti-soul.
chaussée	cf. route.
chausser	lakad (lak-) e votou, etc... cf. mettre.

chaussette	berr-loer f. berr-loerou cf. bas /vêtement/ une paire de chaussettes : eur re berr-loerou. des paires de chaussettes : berr-loereier. sa grand-mère lui a tricoté des chaussettes : e vamm-goz he- deus grêd berr-loerou stamm dezañ.
chausson	chaosson m. -ou cf. chaussure.
chaussure	botez f. botou ; boteier /paires/ une paire de chaussures : eur re-votou. des paires de chaussures : boteier. des chaussures neuves : botou nevez. des chaussures noires (jaunes) : botou du (melen). une paire de vieilles chaussures : eur re-votou koz. de belles chaussures : botou brao. ces chaussures sont chères : ker eo ar botou-ze. ses chaussures sont trop grandes : re vraz eo e votou dezañ. mes chaussures me serrent : striz eo ma botou din. une paire de grosses chaussures : eur re-votou braz. des chaussures usées : botou uzed. des chaussures trouées : botou toull. des chaussures déformées : botou distummed. des chaussures dépareillées : botou dibar. des chaussures sales : botou louz. acheter des chaussures neuves : prena botou nevez. essayer des chaussures : esa. eur re-votou. mettre (enlever) ses chaussures : lakad (tenna) e votou. cirer ses chaussures : koara (sira) e votou. brosser ses chaussures : brousta e votou. lacer (délacer) ses chaussures : lasa (dilasa) e votou. boucler (déboucler) ses chaussures : boukla (divoukla) e votou. porter (chercher) ses chaussures chez le cordonnier : kas (mond da gerhad) e votou ti ar here. réparer des chaussures : dresa botou. ressemeler des chaussures : peurzolia botou. perdre une chaussure : koll eur votez. ne marche pas dans l'eau avec tes chaussures neuves ! : ne gerz ked barz an dour gand da votou nevez ! changer ce chaussures : chañch botou. le bout de la chaussure : beg ar votez. la semelle de la chaussure : sol ar votez. le talon de la chaussure : seul (talon) ar votez. l'intérieur de la chaussure : diabarz ar votez. des lacets de chaussures : lasou botou. un marchand de chaussures : eur marhadour boteier. un magasin de chaussures : eur stal voteier. une brosse à chaussures : eur broust (bros ; broñs) boteier.
chauve	/adj./ moal ; disto il est chauve : moal eo. il est presque chauve : kazi moal eo. il devient chauve : dond a ra da veza moal. chauve comme un œuf : moal vel eur vi.

chauve	un chauve : eun den moal ; eur penn moal.
chauve-souris	askell-grohen f. eskell-krohen ; logodenn-dall f. logod-dall ; logodenn penn-dall f. logod penn-dall. cf. oiseau.
chaux	raz m. ; ra m. du lait de chaux : lèz raz. de l'eau de chaux : dour raz. de la chaux vive : raz beo.
chavirer	chavira (chavir-) cf. renverser la barque a chaviré : chavired eo ar vag.
chef	1) penn m. -ou il a été nommé chef de compagnie : laked eo bed e penn eur gompagnunez. le chef de Saint Gonery /relique/ : penn sant Koneri. 2) mestr m. mistri le chef des voleurs : mestr al laeron. le chef de la bande : mestr ar vandenn. il a désobéi à ses chefs : n'e-neus ked sented ouz e vistri. le chef /de cuisine/ du restaurant : mestr-keginer ar restôrant. 3) chef m. -ou il est chef-mécanicien : chef-mekanisfan eo. 4) /divers/ il lui a écrit de son propre chef : skrived e-neus dezañ anezañ e-unan. le chef de famille /trad./ : an ozah ; an oah.
chef-d'œuvre	1) töl-micher m. tölou-micher /artisan/ il a fait son chef-d'œuvre : grêd e-neus e döl-micher. 2) pennoberenn f. -ou /livr./ les chefs-d'œuvre de notre littérature : pennoberennou an lennegez.
chef-lieu	le chef-lieu du canton : ar gêr ganton. le chef-lieu du département : penn-kêr an departamant.
chemin	hent m. henchou un chemin de terre : eun hent douar. un chemin charretier : eun hent-karr. un chemin de sable : eun hent-tréz. un chemin de traverse : eun hent treuz. un chemin de croix : eun hent kroaz. un chemin creux : eun hent don. un chemin étroit (large) : eun hent striz (ledan) le chemin du bourg (de la gare) : hent ar bourk (ar gar). un petit chemin : eun hent bihan. un bon (mauvais) chemin : eun hent kaer (fall).

le bon (mauvais) chemin : an hent mad (fall).
 l'ancien (le nouveau) chemin : an hent koz (nevez).
 un chemin humide (sec) : eun hent gleb (seh).
 un chemin glissant : eun hent lampr ; eun hent rikluz ; eun hent ramp.
 un chemin boueux (pierreux) : eun hent fankeg (meineg).
 un chemin égal (inégal) : eun hent rust (plén).
 un chemin sinueux (droit) : eun hent kildroenneg (eeün).
 un chemin cahoteux : eun hent strohsuz.
 un chemin escarpé : eun hent sonn.
 un chemin sans issue : eun hent dall.
 un chemin facile (difficile) : eun hent êz (d'fez).
 un chemin en zig-zag : eun hent kamm-digamm ; eun hent pleg-dibleg.
 un chemin de halage : eun hent kanol.
 il a fait beaucoup de chemin : grêd e-neus kalz hent.
 il a pris le chemin de l'école : kemered e-neus hent ar skol.
 il s'est mis en chemin de bonne heure : abred e-neus kemered penn an hent.
 aller son chemin : mond gand e hent.
 poursuis ton chemin : dalh gand da hent.
 j'ai dû demander mon chemin : ranked am-eus goull ma hent.
 montre-lui le chemin du château : diskouez dezañ an hent da vond d'ar hastell.
 j'ai perdu mon chemin : kollad am-eus ma hent.
 tu t'es trompé de chemin : kemered teus an hent fall.
 le chemin est barré : stanked eo an hent.
 il faut passer par un autre chemin : red eo deoh mond dre eun hent all.
 ce chemin ne mène nulle part : an hent-se ne gas da neb leh.
 battre les chemins : foeta an henchou.
 c'est à mi-chemin de chez moi : hanter-hent ema deuz du-mañ.
 allez jusqu'au bout du chemin : kit beteg penn an hent.

chemin de fer 1) hent-houarn m. henchou-houarn cf. chemin
 les employés du chemin de fer : pôtréd an hent-houarn.
 une voie de chemin de fer : eun hent-houarn.

2) /divers/
 un billet de chemin de fer : eur billed treñ.
 voyager en chemin de fer : beaji gand an treñ.

chemineau foeter-hent m. foeterien-hent

cheminée 1) cf. âtre

2) chiminal f. -ou ; siminal f. -ou /conduit de fumée/
 une cheminée large (étroite) : eur chiminal frank (striz).
 une cheminée haute : eur chiminal uhel.
 une cheminée basse : eur chiminal izel.
 ramoner la cheminée : ramoni ar chiminal ; skarza ar chiminal.
 on voit fumer les cheminées : gweled e vez ar chiminalou o tivogedi.
 la cheminée tire mal : ne denn ked mad ar chiminal.

la cheminée est pleine de suie : ar chiminal zo leun a huzil.
 on a mis des andouilles à fumer dans la cheminée : laked zo bed andouill da vogedi barz ar chiminal.
 un morceau de porc est suspendu dans la cheminée : eun tamm kig moh zo a-ispill (en-pign) barz ar chiminal.
 la cheminée est bouchée : stanked eo ar chiminal.
 le vent a abattu la cheminée : diskared eo bed ar chiminal gand an avel.
 le bas de la cheminée : traoñ ar chiminal.
 le haut de la cheminée : beg ar chiminal.
 le manteau de la cheminée : mantell ar chiminal.
 le feu a pris dans la cheminée : kroged eo an tan barz ar chiminal.

3) /divers/
 il reste toute la journée au coin de la cheminée : chom a ra pad an deiz e korn an oaled.

cheminer ober (gra-) hent

cheminot il est cheminot : hennez a labour war an hent-houarn.
 les cheminots ont travaillé toute la nuit : bed eo pôtréd an hent-houarn o labourad pad an noz.

chemise 1) roched m. -ou /d'homme/
 une chemise blanche : eur roched gwenn.
 une chemise à carreaux : eur roched kareed.
 une chemise propre (sale) : eur roched prob (louz).
 une chemise neuve (vieille) : eur roched nevez (koz).
 une belle chemise : eur roched brao.
 une chemise rayée : eur roched barremmed.
 ma chemise est trop petite (grande) : re vihan (vraz) eo ma roched din.
 une chemise amidonnée : eur roched ampezad.
 une chemise de couleur : eur roched liou.
 une chemise à fleur : eur roched fleuried.
 acheter une chemise neuve : prena eur roched nevez.
 mets ta chemise : gwisk da roched.
 enlevez votre chemise : tennit ho roched.
 il a encore déchiré sa chemise : roged (freged) neus e roched adarre.
 laver une chemise : kanna eur roched.
 repasser les chemises : feri ar rochedou.
 changer de chemise : chañch e roched.
 fais attention à ne pas tacher ta chemise : diwall da darcha da roched.
 sa chemise était chiffonnée : joged oa e roched.
 boutonne ta chemise : prenn da roched.
 ta chemise commence à être usée : krog eo da roched da veza uzad.
 sa chemise était déboutonnée : dibrenn oa e roched.
 une chemise trouée : eur roched toull.
 il ne sait pas plier ses chemises : ne oar ked plega e rochedou.

tu as encore mis cette vieille chemise : ar hoz roched-se zo ganit hoaz.

il porte encore ses chemises de l'armée : e rochedou soudard vez gantañ hoaz.

il est en bras de chemise : ema e korv e roched.

le col de la chemise : kolier (kol) ar roched.

il a une chemise à manches longues (courtes) : eur roched mañchou hir (berr) zo gantañ.

la queue de la chemise : lostenn ar roched.

les boutons de la chemise : boutonou ar roched.

le devant de la chemise : penn a-rôg ar roched.

le dos de la chemise : penn a-drefiv ar roched.

une chemise de nuit : eur roched noz.

2) hiviz f. -ou ; hifiviz f. -ou /de femme/

3) /divers/

il est venu ouvrir en chemise : deued oa da zigori an nor en e roched.

chenal kanol f. -iou
un navire a coulé au milieu du chenal : éd zo eur vatimant d'ar strad kreiz ar ganol.

chenapan lakepod m. -ed ; lampon m. -ed

chêne 1) /arbre/ gwezenn-zero f. gwez-dero ; gwezenn-dero f. gwez-dero ; dervenn f. gwez-dero cf. arbre
un chêne centenaire : eur wezenn-dero a gant vloaz.
une feuille de chêne : eun delien-dero.
un petit bois de chênes : eur hoad dero bihan.

2) /matière/ dero ; koad dero
le chêne est plus dur que le sapin : kaletoh eo an dero vid ar sapin.

un table en chêne : eun dôl zero.
le chêne brûle lentement : ne zev ked buan ar hoad dero.

chenille preñv m. -ed cf. vers ; biskoulenn f. biskoul
une chenille poilue : eur preñv bleveg.
une chenille verte : eur preñv kôl.

cheptel cf. bêtañl.

chèque chek m. -ou ; chekenn f. -ou
un carnet de chèques : eur harned chek.
payer par chèque : péa gand eur chek.
ce chèque n'est pas signé : ar chek-mañ n'eo ked bed sined.

cher 1) kër /prix/
c'est trop cher : re gêr eo.
ce n'est pas cher : n'eo ked kër.
la vie est chère à Paris : barz Pariz eo kër ar vuhez.

je ne l'ai pas payé cher : n'am-eus ked pëed anezañ kër.
cela ne vous coûtera pas cher : ze ne gousto ked kër deoh.
c'est très cher : kër-kër eo ; kër-braz eo.
ce n'est pas très cher : n'eo ked gwall-gër.

2) ker /affection/
cher ami ! : ma mignon ker !
chers auditeurs ! : ma chilaouerien ger !

3) /divers/
mes bien chers frères, mes bien chères sœurs ! : ma breudeur ha ma hoarezed kristen !
le plus cher de mes fils : ma mab muia kared.

chercher

1) klask (klask-) /effort pour trouver, connaître/
je cherche mes lunettes : emañ o klask ma lunedou.
vous cherchez quelqu'un ? : o klask unan-bennag oh ?
il vous cherche partout : ema o klask war ho lersh partoud.
il cherche son chemin : ema o klask e hent.

il cherche des noises à tout le monde : klask a ra jeu ouz toud an dud.

il cherche toujours des prétextes pour ne pas venir : dalmad e vez o klask digareziou vid nompaz dond.

il ne faut pas chercher à comprendre : ne dalv ked ar boan klask kompren.

n'allez pas chercher si loin : n'it ked da glask ken pell.

il cherche toujours à rendre service aux autres : atao e vez o klask renta servij d'ar re all.

chercher du travail : klask labour.

il cherche à se marier : ema o klask fortuna.

je ne cherche que le bonheur : ne glaskan nemed an eürusted.

chercher midi à 14 heures : klask pemp troad d'ar maout.

2) kerhad (kerh-) /effort pour obtenir/
va chercher du pain chez la voisine : kerz da gerhad bara ti an amezeg.

elle est partie chercher les enfants à l'école : éd eo d'ar skol da gerhad ar vugale.

il est allé chercher les vaches au champ : éd eo d'ar park da gerhad ar zaout.

sa femme est partie chercher le médecin : éd eo e wreg da gerhad ar medesin.

3) /divers/
chercher des châtaignes : kistina.
chercher des mûres : mouara.
chercher des nids : neiziata.
aller chercher de l'eau à la fontaine : mond daved dour d'ar feunteun.
cherche ! /à un chien/ : furch !

chercheur klasker m. -ien
un chercheur d'or : eur hlasker aour.

chercheuse klaskerez f. -ed

chère	cher f. faire bonne chère : ober cher vad.
chéri(e)	1) /nom/ ne se traduit pas en breton. 2) /adj./ kared mon fils chéri : ma mab kared. ma mère chérie : ma mamm gared.
chérir	cherisa (cheris-) cf. aimer.
chétif	fall un petit garçon chétif : eur pôtr bihan fall.
cheval	marh m. ; loen kezeg m. ; aneval m. ; jao m. ; loen m. ; pl. kezeg ; roñsed /sans distinction de sexe/ un grand (petit) cheval : eur marh braz (bihan). un vieux cheval : eur marh koz un mauvais cheval : eur hoz varh. un cheval maigre : eur marh treud. un cheval calme (ombrageux) : eur marh dous (spontig). un cheval emballé : eur marh pennfolled. un cheval docile (méchant) : eur marh doñv (droug). un cheval poussif : eur marh poused. un cheval entier : eur marh antier cf. étalon. un cheval hongre : eur marh spaz ; eur marh spahed. un cheval morveux : eur marh morvouz. un cheval mort (blessé) : eur marh maro (blesed ; gloazed). un cheval boiteux : eur marh kamm. un cheval fourbu : eur marh forbued. un cheval blanc (noir) : eur marh gwenn (du). un cheval bai : eur marh yell ; eur marh gell. un cheval gris : eur marh griz. un cheval gris-pommelé : eur marh glaz marelled. un cheval alezan : eur marh alezan. un cheval anglais : eur marh sôz. un cheval breton : eur marh breton. un cheval arabe : eur marh arap. un cheval limonier : eur marh limon. un cheval de somme : eur marh samm. un cheval de poste : eur marh postier. un cheval de trait : eur marh labour ; eur marh karr. un cheval de selle : eur marh dibr. seller un cheval : dibra eur marh. brider un cheval : brida eur marh. atteler un cheval : staga eur marh. s'occuper des chevaux : ober war-dro ar hezeg. soigner les chevaux : soagnal ar hezeg. abreuver les chevaux : rei dour d'ar hezeg. étriller un cheval : skrivellad eur marh. ferrer un cheval : houarnia eur marh. il mène son cheval par la bride : kas a ra e varh gand ar brid. il bat son cheval : skei a ra war e varh. élever des chevaux : sevel kezeg.

	il a fallu abattre le cheval : red eo bed laha ar marh. acheter (vendre) un cheval : orena (gwerza) eur marh. monter à cheval (descendre de cheval) : mond war e varh (diskenn diwar e varh). il apprend à monter à cheval : ema o teski mond war varh. elle est tombée de cheval : kouezed eo diwar he marh. le cheval galope : ema ar marh o vond d'an daoulamm. le cheval trotte : ema ar marh o vond d'an trot. le cheval va au pas : ema ar marh o vond d'ar paz. le cheval va l'amble : ema ar marh o vond d'ar paz éz. le cheval rue : ema ar marh o winkal. le cheval se cabre : saved eo ar marh war e zaou droad a-dreñv. le cheval hennit : gourizial a ra ar marh. le cheval piaffe dans l'écurie : ema ar marh o paoata barz ar marchoñsi. le cheval a sauté par-dessus la barrière : lammed e-neus ar marh dreist ar gloued. le cheval broute dans le pré : ema ar marh o peuri barz ar prad. un tête de cheval : eur penn marh. les naseaux du cheval : fronnellou ar marh. la crinière du cheval : moue ar marh. à dos de cheval : war gein eur marh. les flancs du cheval : kosteziou ar marh. du crin de cheval : reun kezeg. la croupe du cheval : talier ar marh. la queue du cheval : lost ar marh. les sabots du cheval : kern ar marh. le harnachement du cheval : harnez ar marh. la bride du cheval : brid ar marh. le collier du cheval : gwakol ar marh. le licol du cheval : kabestr ar marh. la selle du cheval : dibr ar marh. mettre le mors à un cheval : gwekenna eur marh.
chevalet	marh-koad m. marhou-koad
chevalier	marheg m. marheien
chevauchée	marhekadenn f. -ou
chevaucher	les deux planches se chevauchent ; an daou blankenn zo an eil war egile.
chevelu	bleveg.
chevelure	pennad bleo m. cf. cheveux.
chevet	penn ar gwele m. sa mère est restée toute la nuit à son chevet : chomed eo e vamm pad an noz e penn e wele.

cheveu

1) blevenn f. bleo
 des cheveux longs (courts) : bleo hir (berr).
 des cheveux fins : bleo fin.
 des cheveux frisés (raïdes) : bleo rodelleg (reud).
 des cheveux brillants (ternes) : bleo lufr (dilufr).
 des cheveux épais : bleo fuilled.
 des cheveux clairsemés : bleo tano.
 des cheveux blonds (bruns) : bleo melen (du).
 des cheveux blancs (gris) : bleo gwenn (griz ; loued).
 des cheveux roux : bleo ru.
 il s'est fait couper les cheveux : bed eo o troha e vleo.
 il commence à perdre ses cheveux : krog eo da goll e vleo.
 elle vient de se laver les cheveux : o paouez gwalhi he bleo ema.
 elle se brosse les cheveux chaque soir : bemnoz e broust he bleo.
 il l'a soulevée par les cheveux : dibraded e-neus anezi war-bouez he bleo.
 sa mère lui a tressé les cheveux : plañsonned eo bed he bleo dezi gand he mamm.
 maman ! il m'a tiré les cheveux ! : mamm, sached e-neus war ma bleo !
 se friser ses cheveux : friza e vleo.
 se teindre les cheveux en noir : liva e vleo en du.
 se décolorer les cheveux : dizliva e vleo.
 s'arranger les cheveux : kempenn e vleo.
 une brosse à cheveux : eur broust-bleo.
 une épingle à cheveux : eur spillenn vleo.
 ils se sont pris aux cheveux : sach bleo zo bed etrezo.
 il avait si peur que ses cheveux se dressaient sur sa tête : ken sponted e oa ma save e vleo sonn war e benn.

2) /divers/
 il a un cheveu sur la langue : bisted eo.
 couper les cheveux en quatre : pizmiga.

cheville

1) /anatomie/ uvern m. daou uvern (paire) ; ibill troad m. ibillou troad
 je me suis démis la cheville : troed meus ma uvern.
 il avait de l'eau jusqu'aux chevilles : sevel a ree an dour beteg ibillou e dreid.

2) /bois, métal/ ibill m. ibillou
 une cheville de bois : eun ibill koad.
 une cheville de fer : eun ibill houarn.

chèvre

gaor f. geor (givri) ; gavr f. gevr (givri) /animal et instrument/
 la chèvre broute au bord du chemin : ema ar haor o peuri war vord an hent.
 la chèvre bête : ema ar haor o vegeliad.
 la chèvre a sauté par-dessus le talus : lammed eo ar haor dreist ar hleuz.
 mener la chèvre au bouc : kas ar haor d'ar bouh.
 traire les chèvres : goro ar geor.
 les cornes de la chèvre : kerniel ar haor.

une peau de chèvre : eur hrohen gaor.
 les sabots de la chèvre : treid ar haor.
 les mamelles de la chèvre : bronnou ar haor.
 les pis de la chèvre : teziou ar haor.
 boire du lait de chèvre : eva lèz gaor.
 du fromage de chèvre : fromaj lèz gaor.
 Le Cap de la Chèvre : Beg ar Haor.

chevreau

menn m. -ou
 manger du chevreau : debri kig menn.

chèvrefeuille

gwivoudenn f. gwivoud ; gwezvoudenn f. gwezvoud
 les fleurs du chèvrefeuille : al lèz-gaor ; al lèz-koukou.

chevrette

1) /petite chèvre/ gaor-vihan f. geor-bihan
 2) /femelle du chevreuil/ yourhez f. -ed

chevreuil

yourh m. -ed

chevrier

pôtr ar geor m. pôtréd ar geor

chez

1) /situation/ ti
 vous habitez chez vos parents ? : ti ho tud emah o chom ?
 elle travaille chez Kermarec : labourad a ra ti Gervareg.

2) /mouvement/ di
 chez qui vas-tu ? : di biou emah o vond ?
 ils sont allés boire un verre chez Pierre : éd int da eva peb a vanne di Ber.

3) /divers/
 on est bien chez soi : brao eo beza er gêr /réfléchi/
 il est temps de rentrer chez moi (toi, nous, vous, etc.) :
 poent eo mond d'ar gêr /réfléchi/
 faites comme chez vous ! : grit vel er gêr !
 viens manger chez moi (chez nous) : deuz da zebri du-mañ /non-réfléchi/
 je passerai chez toi (chez vous) tout à l'heure : bremaïg e
 tremenin du-ze /non réfléchi/
 vous avez déjà été chez lui ? (chez elle ; chez eux) : bed oh
 du-hont (eno) hoaz /non-réfléchi/
 le car passe devant chez moi : tremen a ra an otokar dirag ma zi.

chicane

chikan m.
 il cherche chicane à tout le monde : klask chikan a ra ouz tout an dud.

chicaner

1) pizmiga (pizmig-)
 il chicane sur tout : pizmiga a ra war beb tra.
 2) se chicaner : nem chikanad (cf. se chamailler).

chicanier	pizmiger m. -ien
chiche	cf. avare.
chiche !	tu n'es pas chiche de sauter : n'out ked gouest da lammad.
chichis	ardou pl. elle en fait, des chichis ! : homañ a ra ardou, vat !
chicorée	chikore m. du café à la chicorée : kafe-chikore.
chicot	skod m. -ou /arbre coupé/
chien	m. chas un grand (petit) chien : eur hi braz (bihan). un gros chien : eur pez ki. un jeune (vieux) chien : eur hi yaouank (koz). un chien sauvage : eur hi gouez. un chien enragé : eur hi klañv. un chien méchant (doux) : eur hi droug (chentil). un chien blanc (noir) : eur hi gwenn (du). un chien jaune (roux) : eur hi melen (rouz). un chien penaud : eur hi losteg. un chien de chasse : eur hi chase. un chien couchant : eur hi kouchant. un chien courant : eur hi red. un chien de garde : eur hi gward. un chien policier : eur hi polis. un chien-loup : eur hi-bleiz. le chien court : ema ar hi o redeg. le chien m'a mordu à la jambe : kroged e-neus ar hi barz ma garr. le chien ronge ses os : ema ar hi o krignad e askorn. le chien aboie : ema ar hi o harzal. les chiens ont hurlé toute la nuit : bed eo ar chas o yudal pad an noz. le chien flaire les buissons : ema ar hi o c'hvesa barz ar bodou. le chien se gratte : ema ar hi o nem skrapad. le chien gratte la terre : ema ar hi o tiskrapad an douar. le chien ne dort que d'un œil : ar hi ne gousk nemed eul lagad digor. le chien se lèche : ema ar hi o nem lipad. le chien poursuit le lièvre : ema ar hi o kas warlerh ar had. le chien a bondi à la gorge du vagabond : sailled eo ar hi ouz gouzoug ar foeter-hent. le chien garde le troupeau : ema ar hi o tiwall ar zaout. le chien est couché dans sa niche : gourvezed eo ar hi en e loch. le chien est assis aux pieds de son maître : azezed eo ar hi ouz treid e vestr. mets ton chien à la chaîne : stag da gi ouz ar chadenn. le chien court les chiennes : ema ar hi o kiesa.

	as-tu donné à manger aux chiens ? : bed out o kas o boued d'ar chas ? la gueule du chien : genou ar hi ; beg ar hi. le chien remue la queue quand il est content : hija a ra ar hi e lost pa vez kontant. les crocs du chien : dent ar hi. ils sont comme chien et chat : emaint vel ki ha kaz. on l'a enterré comme un chien : planted eo bed vel eur hi. lever le chien du fusil : sevel ki ar fuzuil. ils l'ont chassé comme un chien : kased eo bed kuit vel eur hi
	/divers/ il travaille comme un chien : labourad a ra vel eur marh. nom d'un chien ! : gast ! ; fidamdoustig !
chiendent	treuzyeotenn f. treuzyeot ; louzaouenn ar hi f.
chienne	kiez f. -ed la chienne est en chaleur : ema ar giez e rut. la chienne a eu cinq petits : ar giez he-deus bed pemp ki bihan. la chienne a cinq petits : ar giez zo pemp ki bihan warni.
	/divers/ chienne de vie ! : gast a vuhez !
chier	kahad (kah-) j'ai envie de chier : c'hoant kahad am-eus. il a chié dans sa culotte : kahed e-neus en e vranou. ils l'ont envoyé chier : kased eo bed da gahad ganto.
chiffon	pillou pl. ; druilou pl. un morceau de chiffon : eun tamm pillou. un chiffon sale (propre) : eun tamm pillou louz (prob) un chiffon gras : eun tamm pillou dru. essuyer la table avec un chiffon : torcha an dól gand eun tamm pillou. un tas de vieux chiffons : eur bern koz pillou.
chiffonner	chifa (chif-) ; chika (chik-) ; joga (jog-) il a chiffonné ses habits : chifed e-neus e zillad. le journal est chiffonné : chifed eo ar journal.
	/divers/ cette histoire l'a chiffonnée : laked eo bed d'ez gand an afer-ze
chiffonnier	pillouër m. -ien ; pôtr ar pillou m. pôtréd ar pillou
chiffre	chifr m. -ou
chignon	chignon m. -ou
chimie	chimi f. Je n'ai pas appris ma leçon de chimie : n'am-eus ked desked ma hente! chimi.

chimique	chimik du breton chimique : brezoneg chimik.
chimiste	chimist m. -ed
Chinois	Chinwa m. -ed il a une tête de chinois : hennez e-neus eur penn chinwa.
chinoise	/adj./ chinwa mais : le thé chinois : té ar Chin.
Chinoise	Chinwazenn f. Chinwazezed
chiot	ki bihan m. chas bihan
chipier	cf. voler.
chipie	pikez f. -ed
chique	butun-karot m. une chique : eun tamm butun-karot.
chiqué	faire du chiqué : ober jestroù ; ober chistroù ; ober ardou.
chiquer	chika (chik-)
chirurgie	chirurji f.
chirurgien	chirurgian m. -ed
chiure	des chiures de mouches : kôh kelien.
choc	il a reçu un choc à la tête : bed e-neus eun töl en e benn. le clou s'est plié sous le choc du marteau : pleged e-neus an tach dindan an töl morzol. cela m'a fait un choc : ze e-neus grêd eun töl din.
chocolat	chokola m. un morceau de chocolat : eun tamm chokola.
chœur	1) /architecture/ keur m. les riches étaient dans le chœur et les pauvres au fond de l'église : ar re binvidig a veze barz ar re baour barz lost an iliz. 2) /musique/ chantors tous en chœur : kanom toud asamblez !

	3) /divers/ enfant de cœur : kolist m. -ed ; kurust m. -ed ; masikod m. -ed
choisir	choaz (choaz-) laissez-le choisir lui-même ! : lōskit anezañ da choaz e-unan. lequel as-tu choisi ? : pehini teus choazed ?
choix	1) choaz m. il faut bien faire un choix : red e vez ober eur choaz bennag. 2) dibab m. /qualité/ c'est un tissu de premier choix : an danvez-se zo deuz an dibab kenta. 3) /divers/ il y a beaucoup de choix : kalz a draou zo da choaz. je n'ai pas le choix : n'am-eus ked da choaz.
choléra	kolera m.
chômage	chomaj m. il y a beaucoup de chômage dans la région : barz ar vro a zo kalz a dud en chomaj.
chômé	une fête chômée : eur gouel berz.
chômer	au mois d'août, on ne chôme pas à la campagne : n'eo ked al labour a vank pad miz eost war ar mēz.
chômeur	il est chômeur : en chōmaj ema.
chopine	1) chopin f. -ou /récipient/ 2) chopinad f. -ou /contenu/ une chopine de vin : eur chopinad gwin.
choquant	autrefois, on trouvait choquant qu'une demoiselle épouse un ouvrier : gwechall e kave d'ez an dud gweled eun dimezell o tmezi gand eur micherour. de nos jours, on ne trouve plus choquant qu'une femme se promène nu-tête : en deiz a hirio ne vez ked kaved drol ken gweled eur plah o vale diskabell.
choquer	ce ne sont pas les mêmes mots qui choquent en breton et en français : n'eo ked ar memez gerioù a zisplij d'an dud e brezoneg hag e galleg.
chose	1) tra f. (mais m. après les nombres) -ou c'est une bonne chose : eun dra vad eo. j'ai deux ou trois choses à te dire : daou pe dri zra am-eus da lared dit.

avant toute chose : rôg peb tra.
 chaque chose en son temps : peb tra d'he houlez.
 les choses étant ce qu'elles sont : an traou o veza vel m'emaïnt.
 c'est peu de chose : nebeud a dra eo.
 la moindre chose le rend malade : klañv e vez gand an disterra tra.
 il ne sait pas grand chose : ne oar ked kalz tra.
 je n'ai pas grand chose dans ma valise : n'am-eus ked kalz a draou barz ma malizenn.
 il y aurait beaucoup de choses à dire : meur a dra a vije da lared.
 c'est une chose extraordinaire : ze zo eun dra dreist-ordinal.
 il se passe de drôles de choses, dans cette maison : traou drol a hoarvez barz an ti-mañ.
 il a dit de vilaines choses sur toi : traou vil e-neus lared diwar da benn.
 la même chose, s'il vous plaît ! : memez tra, mar plij !
 n'avez-vous pas autre chose à dire ? : n'ho-peus ked traou all da lared ?
 j'ai quelque chose dans l'œil : beza zo eun dra bennag barz ma lagad.
 avez-vous besoin de quelque chose d'autre ? : n'ho-peus ked ezomm deuz eun dra-bennag all ?
 c'est déjà quelque chose ! : ze zo dija eun dra-bennag.
 j'ai vu bouger quelque chose : gweled am-eus eun dra bennag o finval.
 donnez-moi quelque chose de chaud : lakit eur banne traou tomm din.
 je voudrais quelque chose de moins cher : eun dra bennag marhadmatoh am-oa ezomm.

2) /divers/
 de deux choses l'une : unan a zaou.
 ça, c'est quelque chose ! : biskoaz kemend-all !

chou

1) kôlenn f. kôl ; penn-kôl m. kôl
 un gros chou : eur gôlenn vraz.
 un chou pommé : eur gôlenn bome.
 des choux à vaches : kôl sklech.
 du chou rouge : kôl ru.
 planter des choux : planta kôl.
 manger du chou : debri kôl.
 de la soupe au chou : soubenn gôl.
 couper des feuilles de choux : kutuill kôl.
 une feuille de chou : eun delienn gôl.
 le cœur du chou : kalonenn ar gôlenn.
 un trognon de chou : eun dreujenn gôl.

2) /divers/
 faire chou blanc : ober tro wenn.
 des orailles en feuilles de chou : diskouarn pak-an-avel.

chouan

chouant m. -ed

chouette kaouenn f. -ed
 on entend la chouette hululer dans le bois : kleved a reer eur gaouenn o hopa barz ar hoad.

chou-fleur kôlenn-fleur f. kôl-fleur cf. chou

choyer cf. cajoler

chrême le saint-chrême : an oleo sakr.

chrétien kristen m. -ien
 les chrétiens croient en un seul Dieu : ar gristenien a gred en eun Doue hebken.
 les bons chrétiens : ar gristenien vad.

chrétien /adj./ kristen
 les frères des écoles chrétiennes : frerien ar skolioù kristen.
 la foi chrétienne : ar feiz kristen.

chrétienne kristenez f. -ed
 c'est une bonne chrétienne : eur gristenez vad eo.

chrétienté la chrétienté : ar bed kristen.

christianisme le christianisme : al lezenn gristen.

chrysanthème fleurenn-gala-goañv f. fleur-kala-goañv ; fleurenn-gouel-an-011zent f. fleur gouel-an-011zent.

chuchotement chuchumuchu m.
 on entendait des chuchotements : kleved e veze tud o kôzeal chuchumuchu.

chuchoter kôzeal (kôze-) chuchumuchu ; kôzeal (kôze-) goustadig.

chut tav 'ta ! ; tavit 'ta ! ; grik !

chute 1) lamm m. -ou
 il a fait une chute de bicyclette : bed e-neus eul lamm gand e velo.
 une chute d'eau : eul lamm-dour.
 une mauvaise chute : eur gwall lamm.
 2) /divers/
 la chute des feuilles commence en septembre : e miz gwengolo e komañs an deliou da goueza.
 après la chute du gouvernement : goude ma oa kouezed ar gouarnamant.

ci	1) amañ cf. ici de-ci de-là ; par-ci par-là : amañ hag ahont. ci-après : amañ war le ^{erh} . ci-dessus : amañ diar ^{oq} . mais : comment ça va ? comme-ci comme-ça : penôz emañ kont ? vel-se 2) -mañ cf. celui-ci, celle-ci, ceux-ci, celles-ci ce livre-ci : al leor-mañ.
cible	gwenn m. tirer à la cible : tenna d'ar gwenn.
ciboire	kustod m.
cicatrice	kleizenn f. -ou ; krezenn f. -ou elle a une cicatrice à la joue : eur gleizenn he-deus war he jod.
cicatriser (se)	kiga (kig-) restez couché jusqu'à ce que votre blessure se cicatrise : chomit gourvezed ahann ma vo kiged ho kouli.
cidre	chistr m. ; jistr m. ; sistr m. du bon cidre : chistr mad. du cidre doux : chistr dous. du cidre amer : chistr c'hwero. du cidre aigre : chistr trenk. du cidre pétillant : chistr bero. du vieux cidre : chistr koz. du cidre de l'année : chistr ar bloaz. du cidre bouché : chistr bouched. une bouteille de cidre : eur voutailad chistr. une bolée de cidre : eun tasad chistr. une barrique de cidre : eur varrikennad chistr. verse-nous donc un verre de cidre : diskenn peb a vanne chistr deom, 'ta. boire du cidre : eva chistr. faire du cidre : ober chistr. il a renversé son verre de cidre : skuilled e-neus e werennad chistr. la chanson du cidre : son ar chistr. des pommes à cidre : avalou chistr. /divers/ de l'eau-de-vie de cidre : lambik ; odivi ; hini kreff.
ciel	1) oabl m. ; neñv m. le ciel est bleu : glaz eo an oabl. le ciel est couvert : goloed eo an oabl. le ciel est clair : skler eo an oabl. regarder le ciel : sellad ouz an oabl. la fumée monte vers le ciel : sevel a ra ar moged trezeg an oabl.

	passer dans le ciel : tremen barz an oabl. il y a beaucoup d'étoiles dans le ciel : kalz stered zo barz an oabl.
	2) neñv m. ; neñvou pl. /religion/ Notre père qui êtes aux cieux : hon tad pehini zo en neñv. Marie, reine du ciel et de la terre : Itron Varia, rouanez an neñv hag an douar. la voûte des cieux : bolz an neñvou. Jésus-Christ est monté au ciel : Jezuz-Krist zo eed d'an neñv.
	3) /divers/ tous les saints des cieux : oll zent ar baradoz. un ciel de lit : eur stel gwele.
cierge	goulouenn-goar f. goulou-koar ; pilied-koar m. pilidou-koar cf. bougie brûler un cierge à Saint Etienne : lakaad eur houlaouenn da Zant Steven.
cigare	sigarenn f. sigarennou cf. cigarette
cigarette	sigaretenn f. sigaretennou une cigarette anglaise : eur zigaretenn zôz. une cigarette américaine : eur sigaretenn amerikan. rouler une cigarette : ober eur zigaretenn. fumer une cigarette : fumi eur zigaretenn ; butunad eur zigaretenn. acheter un paquet de cigarettes : nrena eur pakad sigaretennou. donne-moi une cigarette : damañ din eur zigaretenn. allumer une cigarette : alumi eur zigaretenn. éteignez vos cigarettes : lahit ho sigaretennou. prends une cigarette : kemer eur zigaretenn.
cigüe	1) kegid m. /plante aquatique/ 2) eigenn f. ; jigu f. /plante vénéneuse/
cil	il n'existe pas de mot précis en breton : cf. poil, cheveu. j'ai un cil dans l'œil : eur vlevenn zo barz ma lagad.
ciller	divalvenni (divalvenn-) /battre des paupières/
cîme	1) beg m. -ou la cîme d'un arbre : beg eur wezenn. la cîme du clocher : beg an tour. 2) cf. sommet, faite, crête.
ciment	1) simant m. faire du ciment : trei ar simant. le ciment n'est pas pris : n'eo ked kroged ar simant. le ciment durcit en vingt-quatre heures : kaleda a ra ar simant en eur ober peder eur warn-ugent. 2) /divers/ enduire un mur de ciment : chekad eur vozerenn.

un sac de ciment : eur zahad simant.
dur comme du ciment : ken kaled ha simant.

cimenter simanti (simant-)
on a cimenté le sol de l'étable : simanted eo bed leurkraou ar zaout.

cimetière bered f. berejou
un vieux cimetière : eur vered koz.
le nouveau cimetière : ar vered nevez.
elle va tous les jours au cimetière : bemdeiz eh a d'ar vered.
il a sa tombe dans le cimetière de Kergloff : ema e vez barz bered Kergloff.
les enfants n'ont pas le droit de jouer dans le cimetière : divenned e vez d'ar vugale c'hoari barz ar vered.
le mur du cimetière : moger ar vered.
les arbres du cimetière : gwez ar vered.

cinéma sinema m.
vous allez au cinéma, ce soir ? : mond a reoh d'ar sinema fenez ?
je ne vais jamais au cinéma : n'an ked morse d'ar sinema.
un billet de cinéma : eur billed sinema.

cingler cf. fouetter, battre.

cinq pemp
les cinq doigts de la main : pemp biz an dorn.
cinq sous : pemp kweneg.
cinq cents : pemp kant.
cinq mille : pemp mil.
elle a vingt-cinq ans : pemp bloaz warn-ugent he-deus.
Poullaouen, le 5 mars 1958 : Poullaouen, ar bemp a viz meurzh 1958.
je rentrerai le 5 janvier : return a rin d'ar bemp a viz genver.
il faudrait avoir fini pour le 5 : dao e vefe beza echu benn ar bemp.
dans cinq minutes : benn pemp munut.
cinq fois cinq vingt-cinq : pemp kwech pemp zo pemp warn-ugent.
tous les cinq ans : beb pemp bloaz.
/divers/
une pièce de cinq francs : eur pez ugent real.
quarante-cinq francs : pemzeg skoed.
cinq kilos : deg lur.

cinquante il y avait là une cinquantaine de personnes : eun hanter-kant bennag a dud a oa eno.
il approche de la cinquantaine : tost eo da dapoud e hanter-kant vloaz.

cirquante hanter-kant
cinquante trois ans : tri bloaz hag hanter-kant.
cinquante pour cent : hanter-kant dre gant.

cinquante il n'est pas encore cinquantenaire : n'e-neus ked bed e hanter-kant vloaz hoaz.

cinquantième 1) hanter-kantved
le 19 février est le cinquantième jour de l'année : an naonteg a viz c'hwevrer eo hanter-kantved devez ar bloaz.
2) hanter-kant
dimanche sera le cinquantième anniversaire de l'armistice : disul e vo hanter-kant vloaz e oa bed an armistis.

cinquième pemped
le vendredi est le cinquième jour de la semaine : ar gwener eo pemped devez ar zizun.

cirage siraj m.
une boîte de cirage : eur voestad siraj.
du cirage noir : siraj du.
du cirage jaune : siraj melen.

circonstance cela dépend des circonstances : ze zo hervez.
en raison des circonstances... : an traou o veza vel m'emaint.

circulation tremeniri /rues, routes.../
la nuit, il n'y a pas beaucoup de circulation : diouz an noz ne vez ked kalz a dremeniri.

circuler le sang circule dans nos veines : redeg a ra ar gwad barz on gwaziu.

cire koar m.
les abeilles donnent de la cire et du miel : ar gwenan a ra koar ha mel.
faire fondre de la cire : teuzi koar.

ciré sire m. -iou
un ciré de marin : eur sire martolod.

cirer 1) sira (sir-)
cirer ses chaussures : sira e votou-ler
2) koara (koar-)
le chêne est plus beau quand il est ciré : bravoh vez an dero pa vez koared.

cirier koarer m. -ien

cirque sirk m. -ou (cf. cinéma)

cisaille sizail m. -ou

ciseau	kizell f. -ou un ciseau à bois : eur gizell goad. affûter un ciseau : lemna eur gizell.
ciseaux	sizaill f. -ou une paire de ciseaux : eur zizaill. couper du papier avec des ciseaux : troha paper gand eur zizaill.
ciseler	kizella (kizell-)
citadin	c'est évidemment un citadin : hennez zo eun den deuz kêr, anad eo. les citadins se promènent à la campagne le dimanche : d'ar zul e pourmen kêriz war ar mêt.
citerne	sitern f. -iou il n'y a plus d'eau dans la citerne : n'eus banne dour bed ken barz ar sitern.
citron	sitron m. -iou
civière	kravaz m. -ou ; krivizier porter des pierres sur une civière : kas mein gand eur hravaz.
civil	sivil il est en civil : en sivil ma.
clac !	strak !
clair	sklêr ; splann le ciel est clair : sklêr eo an oabl. une pièce claire : eur gambr sklêr. il a les yeux clairs : daoulagad sklêr e-neus. de l'eau claire : dour sklêr. c'est clair ! : ze zo sklêr ! je ne vois pas clair : ne welan ked sklêr.
clair	sklerijenn f. au clair de la lune : ouz sklerijenn al loar.
clairement	sklêr cf. clair.
clairière	les bûcherons ont construit une cabane dans la clairière : saved zo bed eul loch gand an diskarerien gwez barz toull ar hoad.
clairon	kléron m. -iou sonner du clairon : son ar hléron.

clairsemé	rouez des cheveux clairsemés : bleo rouez. des arbres clairsemés : gwez rouez.
clandestinité	il a vécu toute la guerre dans la clandestinité : chomed eo kuzed pad ar brezel.
clapotis	bourbouill m.
clapoter	bourbouilla (bourbouill-) on entend l'eau clapoter : kleved e vez an dour o vourbouilla.
claque	palvad m. -ou ; dornad m. -ou ; skouarniad m. -ou sa mère lui a donné une claque : bed e-neus eun dornad gand e vamm.
claquement	on entendait les claquements du fouet : kleved e veze ar fouet o strakal.
claquer	strakal (strak-) claquer des mains : strakal e zaouarn. claquer des dents : strakal e zent. claquer la porte : strakal an nor. les volets claquent au vent : strakal a ra ar bavañchou gand an avel.
claquette	klakenn f. -ou /église/
clarinette	1) klarinetezenn f. klarinetez 2) treujenn-gôl /instrument populaire/ jouer de la clarinette : son an dreujenn-gôl. une anche de clarinette : eul lañchenn dreujenn-gôl.
clarté	1) sklerijenn f. la clarté de la lune : sklerijenn al loar. 2) sklerder m. ; sklerded f. Notre-Dame de la Clarté : Itron Varia ar Sklerder. 3) /divers/ vos paroles manquent de clarté : ho komzou n'int ked sklêr awalh.
classe	1) klas m. -ou ils sont dans la même classe : maint barz ar memez klas. il est second-maître de première classe : hennez zo segond-mestr deuz ar henta klas. il a fait ses classes à Hourtin : grêd e-neus e glasou barz Hourtin. la classe 13 : ar hlas trizeg. la grande classe : klas ar re vraz.

2) skol f.
 faire la classe : ober skol.
 aller en classe : mond d'ar skol.
 la salle de classe : ar zal skol.

clavicule alhwez ar skoaz m. ; alhwe ar skoa.

clef, clé alhwez m. -iou ; alhwe m. -iou
 une clef rouillée : eun alhwez vergled.
 une vieille clef : eun alhwez koz.
 une grosse (petite) clef : eun alhwez vraz (vihan).
 la clef de la maison : alhwez an ti.
 la clef de la voiture : alhwez an oto.
 ce n'est pas la bonne clef : n'eo ked an alhwez mad.
 j'ai perdu mes clefs : kolled am-eus ma alhweziou.
 la clef est cachée sous le pot de fleurs : kuzed e vez an alhwez dindan ar pod-fleur.
 la clef n'entre pas dans la serrure : n'a ked an alhwez en toull.
 serrer un boulon avec une clef : starda eur boulon gand eun alhwez.
 /divers/
 fermer à clef : prena an nor ; alhweza an nor.
 ouvrir une porte avec une clef : dizalhweza eun nor.

clémence madelez f. -iou cf. bonté.

clenche liked m. -ou
 la porte n'est fermée que par une clenche : an nor n'eo prenned nemed gand eul liked.

clerc 1) kloareg m. kloer ; kloareged
 2) kler-noter /de notaire/ m. -ien

clergé beleien pl.
 le clergé de la paroisse : beleien ar barrez.

client klient m. -ed
 les campeurs ne sont pas de bons clients : ar gameurien n'int ked kliented vad.

cliente klientez f. -ed
 c'est une vieille cliente : honnez zo eur gliantez koz.

clientèle il a perdu toute sa clientèle : kolled e-neus toud e glianted.

climat cf. temps.

clin serr-lagad m.
 elle m'a fait un clin d'œil : gréd he-deus eur zerr-lagad din.
 en un clin d'œil : en eur zerr-lagad.

clinique klinik m.
 on est allé la voir à la clinique : bed om o weled anezi barz ar hlinik.

cliqueter diridignad (diridign-)
 on entendait les fusils cliqueter : kleved e veze ar fuzuliou o tiridignad.

cliquetis diridign m.
 un cliquetis de chaîne : diridign ar chadennoù.

cloche 1) kloh m. kleier
 la grosse cloche : ar hloh braz.
 une petite cloche : eur hloh bihan.
 la cloche est fêlée : faout eo ar hloh.
 sonner les cloches : son ar hleier.
 le bruit des cloches : son ar hleier.
 le battant de la cloche : bazoulenn ar hloh.
 2) /divers/
 le sonneur de cloches : ar hloher.
 je vais lui sonner les cloches : kleved a ray e begement ganin.
 se taper la cloche : ober eur hovad.

clocher tour m. -iou
 notre clocher est le plus haut du diocèse : tour on iliz eo uhella hini a zo en eskopti.
 un clocher à jour : eun tour dantelezed.
 la foudre est tombée sur le clocher : kouezed eo ar gurun war an tour.
 le clocher de Trégourez se voit de très loin : gweled e vez tour iliz Tregourez euz a bell.
 la flèche du clocher : beg an tour.
 le coq du clocher : kog an tour.

cloche-pied jouer à cloche-pied : c'hoari troadig kamm.

clochette klohig m. kleierigou

cloison speurenn f. -ou ; disparti m. -ou
 une cloison de bois : eur speurenn goad ; eun hanter-deüz m.
 abattre une cloison : diskar eur speurenn.

cloître kloastr m. -ou

clopin-clopant kamm-jilgamm

clöpiner	jilgammad (jilgamm-)
cloporte	gwhrah f. -ed ; laouenn-dar f. laou-dar
cloque	klogorenn f. -ou cf. ampoule
clore	cf. fermer
clos	serr ; serret ; kloz cf. fermé.
clos	park m. -ou ; -eier cf. champ.
clôture	1) klotur m. -iou 2) cf. barrière, haie, talus, grillage, mur, etc. 3) /divers/ une clôture électrique : eur pôtre-saout.
clôturer	kloturi (klotur-)
clou	1) tach m. -ou ; -eier un clou rouillé : eun tach mergled. un clou tordu : eun tach kamm. acheter un cent de clous : prena eur hant tacheier. planter un clou : planta eun tach. arracher un clou : tenna eun tach. la tête du clou : penn an tach. la pointe du clou : beg an tach ; broud an tach. un clou en fer : eun tach houarn. un clou en cuivre : eun tach koevr. un clou de maréchal : eun tach marh. 2) gor m. -iou cf. abcès. 3) /divers/ des clous ! : bleo ! je lui ai rivé son clou : yenned am-eus anezañ.
clouer	tacha (tach-) clouer la couvercle de la caisse : tacha golo ar hased.
clown	1) kloun m. -ed 2) /divers/ il fait toujours son clown : atao e vez oh ober e varmouz.
coaguler	kaouledí (kaouled-) cf. cailler
coasser	kana (kan-) ; rakad (rak-) le soir on entend les grenouilles coasser : diouz an noz e vez kleved ar aned o kana.

cobaye	raz-indrez m. razed-indrez ; raedenn-zoñv f. raed-doñv ; goñg m. -ed
coccinelle	buohig an Otrou Doue f. buohiged an Otrou Doue
coche	ask m. -ou faire une coche à un bâton : ober eun ask war eur vaz.
cochon	1) penn-moh m. ; pemoh m. ; pl. moh un cochon gras : eur pemoh lard. sale comme un cochon : louz vel eur pemoh. engraisser un cochon : larda eur pemoh. élever des cochons : sevel moh. préparer à manger aux cochons : poaza boued ar moh. donner à manger aux cochons : boueta ar moh. châtrer les cochons : spaza ar moh. tuer le cochon : laha ar pemoh. saigner le cochon : gwada ar pemoh. découper le cochon : dispenn ar pemoh. une portée de cochons : eun torrad moh bihan. une soue à cochon : eur hraou moh. une bande de cochons : eur vandennad moh. une tête de cochon : eur penn pemoh. une queue de cochon : eul lost pemoh. une oreille de cochon : eur skouarn pemoh. des pieds de cochons : treid moh. des petits yeux de cochon : daoulagad bihan pemoh. un groin de cochon : fri eur pemoh. des soies de cochon : reun pemoh. les entrailles du cochon : torr ar pemoh. une vessie de cochon : eur wezigell pemoh. le foie du cochon : avu ar pemoh. les boyaux du cochon : bouellou ar pemoh. tu manges comme un cochon : debri a rez vel eur pemoh. il est sale comme un cochon : louz eo vel eur pemoh. vous écrivez comme des cochons : skriva a rit vel moh. 2) kig moh m. /viande/ mettre du cochon à dessaler : lakad kig moh en dizall. cf. porc. 3) /divers/ il nous a joué un tour de cochon : c'hoaried e-neus eun dro louz deom. nous n'avons pas gardé les cochons ensemble : n'om ked bed o tiwall ar zaout asamblez.
cochonnet	/jeu de boules/ mestr m.
cocorico	kokorlio ; on utilise aussi de nombreuses formulettes du type : n'eo ked saved Job !
cocu	dogan m. -ed

coeur	<p>1) kalon f. -ou il a une maladie de coeur : klahv eo e galon. il a bon coeur : kalon vad e-neus. une femme de coeur : eur plah a galon. vous ne l'avez pas fait de bon coeur : n'ho-peus ked grêd se a galon vad. merci de tout coeur : mersi deoh a greiz ma halon. il a un coeur de pierre : eur galon dir e-neus. votre coeur bat trop vite : re vuan e sko ho kalon. son coeur battait très fort : lammad a ree e galon. son coeur ne bat plus : ne sko ked mui e galon. mon coeur se soulève de dégoût : heugi a ra ma halon. elle a eu une peine de coeur : bed he-deus eur boan galon. il rit de bon coeur : c'hoarzin a ra a galon vad. elle a un coeur d'or : eur galon aour he-deus. elle m'a brisé le coeur : lakéd he-deus ma halon da ranna.</p> <p>2) kalonenn f. -ou /coeur d'un végétal ; objet en forme de coeur/ un coeur de salade : kalonenn eur zaladenenn. elle portait un coeur en or sur sa poitrine : eur galonenn aour a oa ganti en he herhenn.</p> <p>3) /divers/ l'as de coeur : ar born a geur. elle en a gros sur le coeur : eur galonad he-deus. viens ici, mon petit coeur : deuz amañ, kalonig ! cette chanson-là, je la connais par coeur : ar zonenn-ze ah ouzon dre an ehvor. la voiture me fait mal au coeur : klahv e vezan en oto.</p>
coffre	<p>1) arh m. arhiou /meuble/ 2) kofr m. -ou /automobile/ il met son chien dans le coffre : lakad a ra e gi barz kofr e oto.</p>
coffre-fort	kofr-houarn kofrou-houarn
cognac	kognag vous prendrez un cognac ? : eur banne kognag po ?
cognée	bouhal f. -iou cf. hache
cogner	<p>1) dosa (dos-) ; tosa (tos-) /coups répétés/ on entend le menuisier cogner toute la journée : klevéd e vez an amunuzer o tosa pad an deiz.</p> <p>2) skei (sko-) ; skoi (sko-) ; stoka (stok-) ; darhaou (darhaou-) j'ai cogné du poing sur la table : skoed meus gand ma dorn war an dôl.</p>
cogner (se)	tosa (tos-) ; dosa (dos-) ; darhaou (darhaou-) il s'est cogné la tête contre la porte : tosed (darhaoued) e-neus e benn aruz an nor.

coiffe	koef m. -ou on ne voit plus beaucoup de coiffe par ici : ne vez ked gweled kalz a goefou dre amañ ken.
coiffer	kriba (krib-) bleo reste tranquille pendant que ta mère te coiffe : chom trankil keid ha m'ema da vamm o kriba da vleo dit.
coiffer (se)	kriba (krib-) e vleo se coiffer avec un peigne (une brosse) : kriba e vleo gand eur grib (eur broust).
coiffé	elle est bien coiffée : brao ma he bleo ganti. il est toujours mal coiffé : atao e vez difardouill. il est coiffé d'une casquette à carreau : eur gasketenn garrezed zo gantañ war e benn.
coiffeur	koefeur m. -ien ; koafeur m. -ien ; perrukenner m. -ien (désuet) un bon coiffeur : eur hoefer mad. il est parti chez le coiffeur : Ëd eo di ar hoefer.
coiffeuse	koeferez f. -ed /métier/
coiffure	1) cf. chapeau, bonnet, etc. 2) /divers/ elle a changé de coiffure : peut s'exprimer de diverses manières ; par exemple : trohed he-deus he bleo (elle s'est coupé les cheveux), ou lakéd he-deus friza he bleo (elle s'est fait friser les cheveux).
coin	<p>1) yenn m. -ou ; genn m. -ou /outil/ j'ai fendu la grosse bûche avec un coin : faouted an-eus an eteo braz gand eur yenn.</p> <p>2) korn m. -iou /angle/ au coin du feu : e korn an oaled. au coin d'un bois : e korn eur hoad. sur le coin de la table : war gorn an dôl. au coin de la rue : e korn ar ru. aux quatre coins du pays : e pevar horn ar vro. le lit est dans le coin de la chambre : ma ar gwele e korn ar gambr. ils ont fouillé la maison dans tous les coins : furched o-deus an ti e kement korn zo toud. regarder du coin de l'oeil : sellad a gorn lagad. il reste toujours tout seul dans son coin : atao e chom e-unan barz e gorn. de quel coin es-tu ? : deuz peseurt korn out ?</p>

- 3) /divers/
il a toujours sa pipe au coin des lèvres : atao e vez e gorn
e pleg e henou.
aller au petit coin : mond a-gostez.
4) koug m. ; korn-tro m. korniou-tro cf. recoin.

- coincer** 1) yenna (yenn-) ; genna (genn-)
j'ai coincé la porte pour l'empêcher de battre : yenned am-eus
an nor vid na skoo ked.
vous m'avez bien coincé, je ne peux pas vous répondre : aze ho-
peus yenned ahanon, n'hallan ked respont ahanon.
2) tapoud (tap-)
il s'est fait coincer par les gendarmes : taped eo bed gand ar
jandarmed.
il a été coincé entre le bateau et le quai : taped eo bed tre
ar vatimant hag ar hê.
il s'est coincé la tête entre barreaux du lit : taped e-neus e
benn tre diou varrenn ar gwele.
3) /divers/
la clé est restée coincée dans la serrure : chomed eo an alhwez
barz he zoull.

- coïn-coïn** kouag-kouag
coïn-coïn, fait le canard : kouag-kouag, eme an houad.

- coïng** aval-stoup m. avalou-stoup

- col** kolier m. -ou /vêtements/
le col de ta chemise est sale : louz eo kolier da roched.
déboutonne ton col : dibrenn da golier.

- colère** il est en colère : droug a zo ennañ.
il se met souvent en colère : alfez e sav droug ennañ.
elle était dans une colère noire : droug ruz a oa enni.
je suis en colère contre lui : droug am-eus outañ.

- coléreux** il est coléreux : buan e sav droug ennañ.

- colin-maillard** jouer à colin-maillard : c'hoari mouchig-dall.

- colique** droug-kov m. ; poan-gov f.
les pommes vertes lui ont donné la colique : taped e-neus droug-
kov gand an avalou glaz.

- collation** merenn vihan f. ; advrenn f. /selon les lieux/
la collation se prend à quatre heures : debred e vez merenn-
vihan da beder eur.

- colle** koll m.
de la colle forte : koll kreñv.
de la colle blanche : koll gwenn.
de la colle de poisson : koll pesked.
un pot de colle : eur podad koll.
de la colle à bois : koll koad.

- collecte** kest f. -ou ; cf. quête.

- collège** skolach m. -ou ; kolaj f. -ou cf. école
un collège de garçons : eur skolach pôtréd.
un collège de filles : eur skolach merhed.

- coller** 1) kolla (koll-) /avec de la colle/
coller un timbre sur une lettre : kolla eun timbr war eul lizer.
2) pega (peg-) /avec une matière autre que la colle/
ses vêtements trempés lui collaient au corps : peged oa e zillad
ouz e gorr, gand gleb e oant.
3) refus (refuz-) /examen/
elle a encore été collée au bac : refuzed eo bed d'he bak adarre.

- collet** krouglas m. -ou ; las-kroug m. lasou-kroug /chasse/
un lièvre pris au collet : eur had taped barz eur hrouglas.

- collier** 1) kolier m. -ou
le nom du chien est écrit sur son collier : skrived eo ano ar hi
war e golier.
elle a perdu son collier de perles : kollad he-deus he holier
perlez.
2) gwakol m. -iou ; bourell f. -ou /cheval/

- colline** menez m. -iou ; mene m. -iou ; toseñ f. -ou
une colline boisée : eur menez goloed a wez.
le sommet de la colline : lein ar menez.
le pied de la colline : troad ar menez.
le versant de la colline : sae ar menez (en montant) ; diskenn
ar menez (en descendant).

- colombe** koulm f. -ed cf. pigeon
une colombe blanche : eur goulm wenn.

- colombier** kouldri m. -ou ; kouldi m. -ou

- colonel** kolonel m. -ed
il a été appelé chez le colonel : galved eo bed ti ar holonel.

- colonies** koloniou pl.
ils ont passé dix ans aux colonies : deg vloaz int bed barz ar
holoniou.

colonne	1) kolonnenn f. -ou /architecture/ 2) colonne vertébrale : livenn-gein f. ; gwalenn-gein f. elle s'est cassé la colonne vertébrale : torred he-deus livenn he hein (gwalenn he hein). 3) bann m. -ou /journal/ 4) lostad m. -ou une colonne de fourmis : eul lostad merien.
coloré	il a toujours le visage coloré après le déjeuner : atao e vez ru e vizaj goude merenn.
colorer	lakad (lak-) da veza + nom de couleur le vin colore l'eau en rouge : ar gwïn a lak an dour da veza ru.
colorer (se)	dond (irr.) da veza + nom de couleur les feuilles se colorent en jaune à l'automne : e fin an hañv e teu an deliou da veza melen.
colorier	liva (liv-) des images à colorier : imajennou da veza lived. des crayons à colorier : kreionou da liva.
colporteur	marhadour m. -ien cf. marchand un colporteur de toiles : eur marhadour lien.
colza	kolza m. un champ de colza : eur parkad kolza.
combat	emgann m. -ou cf. bataille un combat naval : eun emgann war vor.
combattant	les anciens combattants de 14-18 : soudarded koz ar brezel pevarzeg.
combattre	1) nem ganna (nem gann-) combattre un incendie : nem ganna eneb eun tan gwall. il a combattu la République toute sa vie : pad e vuhez eo nem ganned eneb ar Republik. 2) ober ar brezel ; mond d'ar brezel. les pirates combattaient les Anglais : al laeron vor a ree ar brezel d'ar Zözon. les soldats vont combattre : mond a ra ar zoudarded d'ar brezel.
combien	1) ped /suivi d'un nom commun singulier désignant des objets dénombrables ou des êtres vivants/ combien de pommes as-tu mangé ? : ped aval teus debred ? combien de personnes y a-t-il dans la salle ? : ped den zo barz ar zal ?

	2) ped a /suivi d'un nom commun pluriel désignant un ensemble constitué d'êtres vivants/ combien d'enfants ont-ils ? : ped a vugale o-deus ? combien de chevaux attelle-t-on à cette charrette ? : ped a gezeg a vez ouz ar harr-ze ?
	3) pegement a /suivi d'un nom commun singulier désignant une matière/ combien d'argent avez-vous sur vous ? : pegement a arhant a zo ganeoh ? combien de lait donne cette vache ? : pegement a lèz a ro ar vuoh-se ?
	4) /expressions diverses / c'est combien ? : pegement eo ? combien y en a-t-il ? : ped zo ? combien de fois ? : ped gwech ? combien de temps ? : pegeid ? combien y a-t-il d'ici au Bourg ? : pegeid a zo ahann d'ar bourk ?
combe	de fond en comble : deuz an eil penn d'egile. c'est un comble ! : biskoaz kemend-all ! la mesure est comble : barr eo ar muzul.
comédie	komienn f. -ou qui a écrit cette comédie ? : gand piou eo bed saved ar gomeidienn-ze ?
comédien	komedian m. -ed
comédienne	komedianez f. -ed
comestible	mad da zebri cette viande est avariée ; elle n'est pas comestible : brein eo ar hig-mañ ; n'eo ked mad da zebri.
comice	le comice agricole : ar homis.
comique	cf. amusant, drôle, ridicule, etc.
comité	komite m. -ou
commandant	komandant m. -ed il est passé commandant : anved eo bed da gomandant. le commandant du navire : komandant ar vatimant.
commandement	les dix commandements de Dieu : an deg gourhemenn a Zoue.

commander	<p>1) komandi (komand-) il est trop jeune pour commander un navire : re yaouank eo da gomandi eur vatimant. il a commandé un nouveau tracteur : komanded e-neus eun trakteur nevez.</p> <p>2) gourhemenn (gourhemenn-) /donner un ordre/ faites ce qu'on vous a commandé de faire : grit ar pezh a zo bed gourhemenned deoh ober.</p> <p>3) /divers/ le colonel commande le régiment : ar holonel a zo e penn ar rejimant qui commande ici ? : piou zo mestr amañ ?</p>
comme	<p>1) vel ; evel ; giz ; e-giz /prép. conj./ il siffle comme un merle : c'hwitellad a ra vel eur voualh. faites comme moi : grit evel don. quelque chose comme ça : eun dra bennag giz-se. comme de juste : vel just. c'est comme ça : e giz-se 'ma an traou.</p> <p>2) vel ma ; giz ma faites comme on vous le dira : grit vel ma vo lavared deoh. comme il faut : vel m'eo glead.</p> <p>3) da il vaut mieux l'avoir comme ami : gwelloc'h eo kaoud anezañ da vignon.</p> <p>4) peogwir comme il était unade, il n'est pas venu : peogwir e oa klañv, n'eo ked deued.</p> <p>5) pegen ; na /exclamatif/ comme c'est beau : pegen brao eo ! comme vous êtes méchant ! : na droug oh !</p> <p>6) /divers/ elle est jolie comme tout : brao eo ken eh eo ; brao eo ken ha ken. dans l'obscurité j'ai vu comme une ombre : barz an deñvalijenn em-eus gweled eur seurt skeud.</p>
commencement	penn kenta m. ; komañsant m. cf. début
commencer	<p>1) komañs (komañs-) /l'action est envisagée dans son déroulement, dans sa répétition ou dans sa potentialité/ le film commence : ma ar film o komañs. ici, la grand-messe commence à onze heures : amañ e komañs an overenn-bred da unneg eur. quand la salle sera pleine, la séance commencera : pa vo leun ar zal e komañso an abadenn.</p> <p>2) beza (irr.) krog /l'action est envisagée dans son résultat/ le film est commencé : krog eo ar film. il commence à pleuvoir : krog eo d'ober glao. je commence à comprendre : krog on da gompren.</p>

comment	<p>1) penôz ; peseurt mod comment allez-vous ? : penôz ma ar bed ganeoh ? je ne sais pas comment faire : n'ouzon ked penôz ober. il joue n'importe comment : c'hoari a ra n'eus forz penôz. comment le saurais-je ? : penôz e ouifen kement-se ?</p> <p>2) /divers/ comment se fait-il que vous soyez venu ? : petra zo kôz oh deued ? il cherche toujours le pourquoi et le comment : atao e vez o klask ar rag hâg ar perag. comment ! tu n'es pas encore levé ? : petra, n'out ked saved c'hoaz</p>
comméragé	elle passe son temps à faire des comméragés : ne ra nemed lavared traou diwar an dud.
commerçant	koñversant m. -ed ; komersant m. -ed
commerçante	koñversantez -ed ; komersantez f. -ed elle n'est pas commerçante : ne oar ked ar mod da zegemer an dud.
commerce	koñvers m. koñverchou ; komers m. -ou il est dans le commerce des grains : hennez a ra koñvers an ed. une maison de commerce : eun ti koñvers. le port de commerce : ar porz a goñvers. les bateaux de commerce : ar batimañchou koñvers. il navigue au commerce : hennez a navig barz ar hoñvers. la Chambre de Commerce : ar gañbr a goñvers.
commère	flaperez f. -ed ; klakenn f. -ou
commis	komis m. -ien il est commis dans une banque : hennez zo komis barz eur bank.
commissaire	komiser m. -ien
commission	1) kefridi f. -ou j'ai fait votre commission : grêd am-eus ho kefridi. 2) komision f. -ou elle est partie faire ses commissions : ad eo d'ober he homisionou. il fait partie de la commission de la voirie : ma barz komision an henchou.
commissure	cf. coin
commode	êz ; êzed la nouvelle route est plus commode : êsoh eo an hent nevez. son père n'est pas commode : e dad d'eo ked êz ober gantañ.

commun	ce puits est commun aux trois fermes : ar puñs-se a zo tre an tri diegez. les moines prennent leurs repas en commun : debri a ra ar vened toud asamblez. le maquereau est le poisson le plus commun sur nos côtes : ar brezell eo ar pesk a zo ar muia anezañ dre amañ. la vie est le bien commun de tous les hommes : ar vuhez a zo d'an oll dud. je n'ai rien de commun avec ces gens-là : n'am-eus netra da weled gand an dud-se.
communal	les voies communales : henchou ar gomun.
commune	komun f. -iou /notion souvent confondue avec celle de paroisse : parrez f. -iou/ la commune fait 4 000 hectares : eiz mil devez arad zo barz ar gomun. il n'y a plus beaucoup de fermes dans la commune : n'eus ked kalz a fermioù barz ar barrez ken.
communier	1) komunia (komuni-) elle communie tous les dimanches : komunia a ra beb sul. 2) ober (gra-) e bask il a fait sa première communion : grêd e-neus e bask kenta.
communisme	komuniz <u>m</u> m.
communiste	komunist m. -ed
compagnie	1) kompagnunez f. -ou ; kompagnonez f. -ou il travaille dans les bureaux de la Compagnie : labourad a ra barz buoiou ar Gompagnunez. Salut, la compagnie ! : salud, kompagnunez ! 2) /divers/ il vaut mieux être seul qu'en mauvaise compagnie : gwelloc'h eo beza e-unan vid gand tud fall. une compagnie de perdrix : eur vandenn glujiri.
compagnon	cf. camarade.
comparé	kichenn comparée à ma belle-mère, ma femme est un ange : kichenn ma mamm-gaer, ma gwreg zo eun èl.
comparer	1) lakad (laka-) kichenn-ha-kichenn comparez ces deux assiettes ; celle-ci est la plus belle : lakit an daou asied-mañ kichenn-ha-kichenn : hemañ zo bravoh. 2) /divers/

	pour comparer deux vins, il faut les avoir goûtés : vid gouzoud pehini deuz an daou win eo ar gwella eo red beza tañveed an eil hag egile.
compartiment	kompartment m. -chou j'ai trouvé un compartiment vide : kaved am-eus eur hompartment gand den bed barz.
compatriote	1) kenvroad m. kenvroiz ; kenvroadez f. -ed /archaïque/ cher compatriote : kenvroad ker. 2) Jean Le Hir est mon compatriote : Yann an Hir zo deuz ma bro.
compère	komper m. -ien ces deux compères aiment bien se moquer des autres : an daou gomper-ze a blij dezo ober goap ouz ar re all.
complainte	gwerz f. -iou ; cf. chanson
complet	c'est complet : n'eus ken a blas. le livre n'est pas complet : mankoude a ra pajennou barz al leor. il est resté trois jours complets sans manger : chomed eo tri devez penn-da-benn heb debri tamm.
complètement	c'est complètement faux ! : ze zo fês penn-da-benn ! /voir aussi de nombreuses expressions imagées comme : il est complètement fou : hennez zo sod-nay/
compliments	1) gourhemennou pl. faites mes compliments à votre mère : grit ma gourhemennou d'ho mamm. 2) pour féliciter, on emploie diverses formules comme : tous mes compliments pour votre beau travail : eul labour vad peus grêd. le maître m'a fait des compliments : lared neus ar mestr-skol din e oa kontant deuz ma labour.
compliqué	1) difez cf. difficile ce n'est pas bien compliqué : n'eo ked gwall-zîez. 2) kompliked /caractère/ c'est une femme compliquée : eur plah kompliked eo.
compliquer	luzia (luzi-) cf. embrouiller
compréhensible	komprenabl

comprendre	1) kompren (kompren-) ; intent (intent-) sa grand-mère ne comprend pas le français : e vamm-goz ne gompren ked ar galleg. il n'a rien compris de ce que je lui ai dit : n'e-neus komprened netra deuz ar pezh am-eus lared dezañ. 2) /divers/ la Bible comprend l'ancien et le nouveau testament : barz ar Bibl e kaver an testamant koz hag an testamant nevez.
comprimer	cf. presser
compte	1) kont f. konchou faire ses comptes : ober e gonchou. au bout du compte : benn fin ar gont. il n'a pas tenu compte de mes conseils : n'eus ked dalhed kont deuz ma alfoù. je ne m'en étais pas rendu compte : ne oan ked nem rented kont deuz an dra-ze. 2) /divers/ on vous a menti sur mon compte : lared zo bed gevier deoh diwar ma 'fenn. on lui a réglé son compte : grêd eo bed e stal dezañ. ton compte est bon ! : grêd eo ahanout !
compter	konta (kont-) compter son argent : konta e wenneien. il dépense sans compter : dispign a ra heb konta. je compte sur toi : konta a ran warnout.
compteur	konteur m. -ien le compteur à gaz : ar honteur-gaz. relever le compteur : sevel ar honteur.
comptoir	kontouer m. -ou il passe ses journées au comptoir : pad an deiz e vez ouz ar hontouer.
comte	kont m. -ed Monsieur le comte : an otroù ar hont ; an otroù kont le comte de Rohan : ar hont a Rohan.
comtesse	kontez f. -ed
conception	l'Immaculée Conception le mystère de l'Immaculée Conception : Mister Mari Koñseved pur. la fête de l'Immaculée Conception : Gouel Koñsepsion ar Werhez Vari.

concours	konkour m. -iou un grand concours : eur honkour braz.
concurrence	koñkurans f.
condamner	1) barn (barn-) da /juridique/ on l'a condamné à mort (à la pendaison) : barned eo bed d'ar maro (da veza krouged). 2) kondaoni (kondaon-) il a été jugé, mais on ne l'a pas condamné : barned eo bed, med n'eo ked bed kondaoned. 3) beza (irr.) eneb ; sevel (sav-) eneb l'Eglise condamne le divorce : an Iliz a zo eneb an divors. il faut condamner la guerre : red eo sevel eneb d'ar brezel.
condition	1) stad f. cf. état en bonne (mauvaise) condition : e stad vad (fall) 2) /divers/ je le ferai, à condition qu'on m'aide : ober a rin an dra-ze gand ma vin chikoured. tu peux sortir, à condition de rentrer à 10 heures : bez e heliez mond da vale, gand ma returni da zeg eur.
conducteur	c'est un bon conducteur : hennez a oar kas. le conducteur a été tué sur le coup : lahed eo bed an hini a oa o kas war an töl.
conduire	1) kas (kas-) ; kondui (kondu-) /véhicule/ il apprend à conduire : ema o teski kondui. conduire une voiture : kas eun oto ; kondui eun oto. 2) kas (kas-) on a conduit le blessé chez le médecin : kased eo bed an den gloazed di ar medisin. conduire un aveugle par la main : kas unan dall war bouez e zorn. 3) /divers/ le permis de conduire : ar permi.
conférence	koñferans f. -ou ; prezegenn f. -ou /livresque/
confesse	kovez m. -iou aller à confesse : mond da govez.
confesser	kovez (kovez-) ; kovesaad (kovesa-) confesser ses péchés : kovez e behejou.
confesser (se)	se confesser à un prêtre : kovez e behejou d'eur beleg.

confession	1) kovez m. -iou cf. confesse 2) kovesion f. -ou après la confession : goude ar govesion. 3) /divers/ mourir sans confession : mervel digovez.
confessionnal	kador-govez f. kadoriou-kovez
confiance	fiziahs f. ; fiahs f. je n'ai aucune confiance en lui : n'am-eus tamm fiziahs bed ennañ.
confier	fizioud (fizi-) e ; fioud (fi-) barz il m'a confié ses enfants avant de mourir : fizied neus e vugale ennon rôg mervel.
confirmation	konfirmasion f. -ou /religion/
confiture	koñfitur f. de la confiture de mûres : koñfitur mouar. une tartine de confiture : eun tamm bara-koñfitur. un pot de confiture : eur podad koñfitur.
confrère	kenvreur m. kenvreudeur /religion/
congre	silienn-vor f. sili-mor
congrégation	breuriez m. -ou la congrégation du Sacré-Coeur : breuriez ar Galon-Zakr.
connaissance	1) anaoudegez f. j'ai fait sa connaissance l'an dernier : grêd am-oa anaoudegez gantañ warlene. le malade a encore toute sa connaissance : an den klañv e-neus e anaoudegez c'hoaz. 2) /divers/ à ma connaissance : din da houzoud. il a perdu connaissance /évanouissement/ : sempled eo. elle a repris connaissance : deued eo enni he-unan.
connaître	1) anaoud (ana-) ; anavezoud (anavez-) ; anveoud (anve-) il ne connaît pas ses voisins : n'anve ked e amezeien. tu connais ce coin-là ? : anveoud a rez ar horn-ze ? je le connais mal : n'anvean ked anezañ vad. 2) gouzoud (irr.) ; goud (irr.) il connaît le passé et l'avenir : goud a ra ar pezh zo bed hag ar pezh a vo.

	il connaît bien le breton : goud a oar mad ar brezoneg. il n'y connaît rien en voitures : ne oar mann diouz ar gweturioù. il a connu la misère dans son enfance : anveed e-neus ar vizer en e vugaleaj. 3) /divers/ il ne connaît pas sa force, quand il est en colère : ne vez ked mestr warnañ e-unan pa vez droug ennañ.
consacrer	1) sakri (sagr-) cette hostie n'est pas consacrée : an osti-mañ n'eo ked sakred. 2) gwestla (gwestl-) la nouvelle église a été consacrée à la Vierge : gwestled eo bed an iliz nevez d'ar Werhez. 3) rei (ro-) elle consacre tout son temps à son ménage : rei a ra toud heh amzer d'he menaj.
consacrer (se)	1) nem rei (ro-) tu ne te consacres pas assez à ton travail : ne nem roez ked a-walh d'az labour. 2) nem westla (westl-) /rel./ se consacrer à Dieu : nem westla da Zoue.
conscience	1) koñsiahs f. ; koustiahs f. /morale/ une bonne (mauvaise) conscience : eur goñsiahs vad ('fall). 2) /divers/ perdre (repandre) conscience : cf. connaissance. il a la conscience chargée : sammé eo e galon.
conseil	1) ali m. -ou ; kuzul m. -iou de bons (mauvais) conseils : aliou mad (fall) donner un conseil : rei eun ali. j'ai suivi votre conseil : heulied am-eus hoh ali. 2) /divers/ le conseil municipal : ar hoñseill ; ar honsaill.
conseiller	alia (ali-) ; kuzulia (kuzuli-) je lui ai conseillé de rester chez lui : alied am-eus anezañ chom barz ar gêr.
conseiller	un conseiller municipal : eur hoñsailler.
conservé	il s'est blessé le pied avec une boîte de conserve rouillée : blesed e-neus e droad gand eur voest-koñserv mervled. ils ne mangent que des boîtes de conserve : ne zebrent nemed boestajou koñserv.

consolation	frealz m. ; frealzidigez f.
consoler	koñsoli (koñsol-) ; frealzi (frealz-) va la consoler : kerz da goñsoli anezi.
constipé	koñstiped ; boñched /animaux/
construire	sevel (sav-) ils ont fait construire une maison au carrefour : lakêd o-deus sevel eun ti er hroaz-hent.
contagieux	staguz une maladie contagieuse : eur hleñved staguz.
conte	kontadenn f. -ou ; koñchenn f. -ou un joli conte : eur gontadenn vrao. un conte du temps passé : eur gontadenn deuz an amzer-goz. dire un conte : konta eur gontadenn.
contenance	quelle est la contenance de cette barrique ? : ped litrad ah a barz ar varrikenn-ze ?
contenir	cette barrique contient 200 litres de cidre : ar varrikenn-ze a zo daou hant litrad chistr enni. mais : cette barrique peut contenir 200 litres de cidre : ar varrikenn-ze a zalh daou hant litrad chistr.
content	1) kontant /adj./ il n'est jamais content : morse ne vez kontant. je suis content de vous : kontant on diouzoh. 2) gwalh m. /nom/ il a mangé son content : debred e-neus e walh.
contenu	le contenu d'une brouette : eur garrigellad. je n'en connais pas le contenu : ne ouzon ked petra zo barz.
conter	konta (kort-) cf. raconter
conteur	konter m. -ien un vieux conteur : eur honter koz.
conteuse	konterez f. -ed une bonne conteuse : eur gonterez vad.
continent	douar braz ils sont allés sur le continent : êd int war an douar braz.

continuer	1) derhel (dalh-) continue ton chemin : dalh gand da hent. continue à travailler sans moi : dalh da labourad hebbon. continuez ! : dalhit da vond ! 2) /divers/ il continue à boire, malgré ce que lui a dit le médecin : eva a ra bepred, daoust d'ar pezh e-neus lared ar medecin dezañ.
contraire	kontrol c'est le contraire : ar hontrol eo. c'est tout le contraire : ar hontrol beo eo. au contraire : er hontrol.
contrat	kontrad m. kontrajou
contre	1) ouz l'armoire est contre le mur : ma an armel ouz ar voger. elle serrait son enfant contre son cœur : starda a ree he bugel ouz he halon. 2) eñeb da nous sommes contre la guerre : maom eñeb d'ar brezel. ils sont tous contre moi : toud maint eñeb din.
contrebande	froderez f. /désuet/
contrebandier	froder m. -ien mais un bateau de contrebandiers : eur vag froderez.
contrecœur	il l'a fait à contrecœur : grêd e-neus se en desped dezañ.
contre-courant	à contre-courant : eñeb an dour red.
contredire	dizlavared (dislavar-) ; dizlared (dizlar-) il n'a pas osé me contredire : n'e-neus ked kreded dizlared ahanon.
contremaître	kontremestr m. kontremistri
contrition	l'acte de contrition : an akt a gontrision.
contrôler	kontroli (kontrol-)
contrôleur	kontroleur m. -ien
convenable	prob ; deread il serait plus convenable de lui rendre visite : propoh e vije mond da weled anezañ. une jeune fille convenable : eur plah-yaouank deread.

convenir	cela me convient : mad eo din.
conversation	1) kôz f. ; diviz m. changer de conversation : chañch kôz. sa conversation est décousue : n'eus na penn na lost d'e gôz. 2) /divers/ nous avons eu une longue conversation : bed om o kôzeal pad pell.
convertir	koñvertisa (koñvertis-) /religion/ il est difficile de convertir les musulmans : d'fez eo koñvertisa ar vuzulmaned.
convier	kouvia (kouvi-) cf. inviter
convoquer	gelvel (galv-) ; gelver (galv-) ; gervel (galv-) il a été convoqué chez le juge : galved eo bed dirag ar barner.
copain	kamarad m. -ed cf. ami, camarade.
copeaux	skolpenn f. skolpennou ; skolp allumer le feu avec des copeaux de hêtre : c'hweza an tan gand skolp fao. il reste quelques copeaux sous l'établi : chom a ra skolpennou dindan ar bank.
copier	kopia (kopi-) il a copié sur son livre : kopiéd e-neus diwar e leor.
copieux	le repas était copieux : kalz a voued a oa da zebri.
coq	kog m. kigi ; killog m. killieien un gros coq : eur hog braz. un coq gras : eur hog lard. un vieux (jeune) coq : eur hog koz (yaouank). un coq de bruyère : eur hog gouez. le coq est perché sur le tas de fumier : saved eo ar hog war ar bern teil. le coq chante au point du jour : kana a ra ar hog da houloù-deiz. le coq court sans cesse après les poules : atao e vez ar hog war lerh ar yer. se lever au chant du coq : sevel da gan ar hog. fier comme un coq : fier vel eur hog. le coq du clocher : ar hog war an tour. le coq du village : kog ar barrez. le bec du coq : beg ar hog. des plumes de coq : plu kog. une queue de coq : lost eur hog. la crête du coq : kribenn ar hog. les ergots du coq : ellou ar hog.

coque	1) korv m. -ou /navire/ 2) kokouzen f. kokouz /mollusque/ manger des coques : debri kokouz. mais : aller pêcher des coques : mond da gokousa. 3) pluskenn f. plusk ; klosenn f. klos ; klorenn f. klor des coques de noix : klor kraoñ. la coque de l'oeuf est molle : gwag eo pluskenn ar vi. 4) /divers/ des oeufs à la coque : viou tano.
coquelicots	roz-ki ; roz chas ; roz naer ; roz moh.
coqueluche	dreo m. ; paz-yud cet enfant a la coqueluche : ar bugel-mañ ema ar paz-yud gantañ.
coquet	faro ; fiched-brao /bien habillé/
coquette	1) faro ; fiched-brao /bien habillée/ 2) klabouerez f. -ed
coquillage	cf. coque, moule, palourde, huître, etc. mais : un collier de coquillages : eur holier kregin.
coquille	1) krogen m. kregin /mollusque/ une coquille d'huître : eur hrogen istr. des coquilles d'escargots : kregin melved. des coquilles Saint-Jacques : kregin Sant-Jakez. 2) pluskenn f. plusk ; cf. coque 3)
cor	kaledenn f. -ou le vieux facteur a des corps aux pieds : ar faktour koz e-neus kaledennou en e dreid.
corbeau	bran f. brini un corbeau noir : eur vran zu. les corbeaux croassent : koagal a ra ar brini. un nid de corbeaux : eun neiz vran. une plume de corbeau : eur bluenn vran.
corbeille	paner f. ou m. -ou cf. panier
corbillard	karr-kañv m. kirri-kañv suivre le corbillard : mond da heul ar harr-kañv.
cordage	kordenn f. kerdin ; cf. corde.

corde	1) kordenn f. kerdin une longue (courte) corde : eur gordenn hir (verr). une grosse corde (mince) : eur gordenn deo (voan). la corde est tendue (lâche) : tenn (lôsk) eo ar gordenn. une corde pourrie : eur gordenn vreïn. attacher avec une corde : staga gand eur gordenn. détacher une corde : distaga eur gordenn. faire des noeuds avec une corde : ober skoulmou barz eur gordenn. nouer une corde : skoulma eur gordenn. rouler une corde : rodella eur gordenn. dérouler une corde : dibuna eur gordenn. descendre (grimper) à l'aide d'une corde : diskenn (pignad) war bouez eur gordenn. tirer sur la corde : sacha war ar gordenn. les deux bouts de la corde : daou benn ar gordenn. les torons de la corde : kollou ar gordenn. l'âme de la corde : kalonenn ar gordenn. sauter à la corde : c'hoari kordenn. 2) kordennad f. -ou /mesure de bois/ une corde de bois de chauffage : eur gordennad keuneud. 3) /divers/ usé jusqu'à la corde : eed beteg an neudenn.
cordier	kordenna (kordenn-)
cordialement	vous êtes cordialement invités : peded oh a greiz kalon.
cordier	kordenner m. -ien
cordons	le cordon ombilical : kordenn ar gwir.
cordonnier	kereer m. -ien ; kere m. -on
cormoran	morvran f. morvrini
corne	korn m. kerniel une corne pointue : eur horn lemm. une corne droite (tordue) : eur horn eeïn (kamm). une longue (courte) corne : eur horn hir (berr). donner un coup de corne : rei eun töl korn. les bêtes à cornes : al loened korn. <u>mais</u> : un peigne de corne : eur grib askorn.
cornille	cf. corbeau.
cornemuse	cf. bin'ou.
cornique	kerneweg m. /langue : livresque/

cornouaillais	kernevad m. kernevaded
cornouaillais	kerne /adj./ des chansons cornouaillaises : kanaouennou Kerne. le breton cornouaillais : brezoneg Kerne.
cornouaillaise	kernevadez f. -ed
corps	1) korv m. -ou le corps et l'âme : ar horv hag an ene. ils sont perdus corps et biens : kollid int korv ha madou. le corps humain : korv an den. 2) korv maro m. korvou maro ; cf. cadavre le corps est enveloppé dans un linceul : paked eo ar horv maro barz eul lien gañv.
corpulent	korveg
correct	cf. convenable
corriger	1) difazia (difazi-) ; dizvanka (dizvank-) elle me corrige toujours quand je parle : difazied e vezan ganti bepred pa gözean. 2) koriija (korig-) l'instituteur a corrigé les cahiers : ar mestr e-neus korijed ar haierou.
cortège	le cortège nuptial : tud an eured. le cortège funèbre : tud ar hañv. /l'idée même de cortège ne peut être rendue que par le contexte/
corvée	korveenn f. -ou ; kouez m. -iou quelle corvée ! : pebez korveenn !
cosse	klorenn f. klör ; klosenn f. klos ; pluskenn f. plusk des cosses de petits pois : plusk piz.
costume	abid f. abijou un beau costume : eun abid vrao. mon vieux costume : ma abid koz. un costume noir : eun abid zu ; eun abid du. acheter un costume neuf : prena eun abid nevez. se faire faire un costume : lakad ober eun abit nevez. mettre (ôter) son costume : gwiska (diwiska) e abid. attention de ne pas tacher (déchirer) ton costume : diwall da darcha (regi) da abid. il a renversé du café sur son costume : skuilled e-neus kafe war e abid.

repasser un costume : feri eun abid.
 nettoyer un costume : netaad eun abid.
 ranger son costume dans l'armoire : dastum e abid barz an armel.
 ce costume ne me va pas : an abid-mañ n'a ked din.
 suspendre son costume : lakad e abid a-istribill.
 brosser son costume : brousta e abid.
 il portait un beau costume : eun abid vrao oa gantañ.
 le pantalon du costume : bragou an abid.
 la veste du costume : chupenn (porpant) an abid.
 le costume du dimanche : an abid da zui.
 un costume de nocés : eun abid eured.
 mais : une femme en costume bigouden : eur vigoudenn.
 le costume breton : dillajou koz ar vro.

côte

- 1) ôd m. /partie du littoral découverte à marée basse/ òchou ; ocheier
 un marsouin s'est échoué sur la côte : deued zo eur moroh d'an ôt.
- 2) tornôt m. /partie du littoral dominant la grève/
- 3) Arvor /partie habitée du littoral/
 les habitants de la côte : tud an Arvor.
- 4) douar m. /littoral vue de la mer/
 on ne voit pas la côte à cause du brouillard : ne vez ked gweled an douar gand ar vrumenn.
- 5) expressions contenant le mot "mor"
 le sentier suit la côte : mond a ra ar wenojenn hed ar mor.
 sa maison est sur la côte : ema e di e-tal ar mor.
- 6) kreh m. -iou ; krehenn f. -ou ; sao m. saviou ; gra f. -iou
 une longue côte : eur hreh hir.
 la côte est raide : sonn eo ar hreh.
 la côte est dure : stard eo ar hreh.
 monter la côte : sevel ar hreh.
 le bas de la côte : traoñ ar hreh.
 le haut de la côte : penn ar hreh ; beg ar hra.
 à mi-côte, vous trouverez un café : hanter-greh e kavoh eun ostaleri.
- 7) kostazenn f. kostou ; kostæenn f. kostou ; kostenn f. -ou
 /anatomie/
 une côte de veau : eur gostezenn leue.
- 8) /divers/
 côte-à-côte : kichenn-ha-kichenn.

côté

- 1) koztez m. -iou ; koste m. -iou
 il dort sur le côté : kousked a ra war e gostez.
 mettre de l'argent de côté : lakad arhant a gostez.
 il est du côté de Saint-Clet : deuz kostez Sant-Kleñve eo.
 je ne suis pas de son côté : me n'on ked kostez gantañ.
 laisser de côté : loskel a gostez.
 j'ai mal au côté : poan am-eus barz ma hostez.
 c'est une tante du côté de ma mère : eur voereb eo din deuz kostez ma mamm.

- 2) tu m.
 le côté droit (gauche) : an tu deou (kleiz).
 le bon (mauvais) côté : an tu mad (fall).
 de l'autre côté : deuz an tu all.
 de tous côtés : a beb tu.
 un de chaque côté : unan a beb tu.
 des deux côtés de la rue : a beb tu d'an hent.
 aller d'un côté à l'autre : mond deuz an eil tu d'egile.
 changer de côté : chañch tu.
 il ne savait plus de quel côté se tourner : ne ouie ked ken war beseurt tu trei.
 ils sont partis chacun de son côté : Ëd int peb hini diouz e du.
- 3) kichenn
 il habite à côté de la poste : ma o chom kichenn ar post.
 qui est à côté d'elle ? : piou a zo en he kichenn ?
 ce n'est rien à côté de ce que j'ai vu pendant la guerre :
 se n'eo netra kichenn ar pezh am-eus gweled pad ar brezel.
- 4) /divers/
 j'ai un point de côté : ar pistig zo ganin.
 de mon côté, j'aurais dit non : evidon-me mije lared nann.
 la balle est passée à côté de son oreille : tremened eo ar
 vùled he-biou d'e skouarn.
 il y a un buis à côté de la maison : eur vodenn veuz zo tal an ti.
 regarder de côté : selled a gorn.

côtelette

koteletenn f. -ou

coton

koton m.

cou

- 1) gouzoug m. -ou ; goug m. -ou
 un cou long (court) : eur gouzoug hir (berr).
 un gros cou (mince) : eur gouzoug teo (moan).
 je lui tordrai le cou : me a weo e houzoug dezañ.
 serrer le cou de quelqu'un : gwaska war gouzoug unan-bennag.
 allonger le cou : astenn e houzoug.
 prendre un lapin par la peau du cou : tapoud eul lapin war bouez
 e houzoug.
 se casser le cou : torri e houzoug.
 il avait de l'eau jusqu'au cou : sevel a ree an dour beteg e
 houzoug.
 elle a un foulard autour du cou : eur mouchouer a zo ganti en dro
 d'he gouzoug.
 attacher une corde au cou d'un chien : staga eur gordenn en dro
 da houzoug eur hi.
- 2) /divers/
 il m'a sauté au cou : lammed eo d'am herhenn.
 on lui a coupé le cou : dihouged eo bed ; trohed eo bed e houzoug
 dezañ.

couchant

kuz-heol m. cf. ouest.

couchant	un chien couchant : eur hi kouchant. le soleil couchant : an heol o vond da guz.
couche	gwiskad m. -jou une bonne couche de peinture : eur gwiskad mad a livaj. une épaisse couche de neige : eur gwiskad teo a erh.
coucher	1) kousked (kousk-) nous étions couchés dans un bon lit : kousked e oam barz eur gwele mad. coucher dans des draps propres : kousked barz lifseliou prob. coucher par terre : kousked war an douar. coucher à la belle étoile : kousked dindan ar stered. il est couché sur le côté (sur le dos ; sur le ventre) : kousked eo war e gostez (war lein e gein ; war e gov). coucher tout habillé : kousked dillad hag all. il couche avec la femme du maire : kousked a ra gand gwreg an ôtrou mair. as-tu couché le petit ? : laked teus an hini bihan da gousked ? allons nous coucher ! : deom da gousked ! 2) astenn (astenn-) cf. étendre on a couché le blessé sur un brancard : astenned eo bed an hini blesed war eur hravaz. 3) /divers/ l'orage a couché le blé : òd eo an ed war e gostez gand an arne. coucher une armoire : lakad eun armel war he hostez. couché ! : peoh !
couché	1) gourvezed ; gourveed ; en e hourvez ; en e hourve les soldats étaient couchés derrière des sacs de sable : gourvezed e oa ar zoudarded dreñv seier leun a zabl. les uns étaient debout, les autres couchés : darn a oa en o zav, darn all en o hourvez. 2) kuzed le soleil était couché : kuzed e oa an heol.
coucher (se)	1) mond (irr.) da gousked il est temps d'aller te coucher : poent eo mond da gousked. ils se couchent tôt (tard) : abred (diwezad) eh eont da gousked. 2) mond (irr.) en e hourvez ; mond (irr.) en e hourve le chien se couche devant son maître : mond a ra ar hi en e hourvez dirag e vestr. 3) mond (irr.) da guz le soleil se couche vers dix heures : mond a ra an heol da guz war dro deg eur.
couchette	kouchetenn f. -ou
couci-couça	giz-se ; mod-se ; vel-se comment allez-vous ? couci-couça : penñz ma ar bed ganeoh ? giz-se !

coucou	koukou f. -ed ; koukou f. -ed un œuf de coucou : eur vi koukoug. j'ai entendu chanter le coucou : klevet am-eus ar goucou o kana.
coucou !	koukou ! ; koug !
coude	1) ilin m. daouilin ; ilinou donner un coup de coude : rei eun töl ilin. 2) pleg m. -ou le coude de la rivière : pleg ar ster. le coude du tuyau : pleg an duellenn.
cou-de-pied	chouk an troad m.
coudre	1) gwriad (gwri-) ; griad (gri-) coudre des boutons à un manteau : gwriad boutonou ouz eur vantell. coudre à la main : gwriad gand an dorn. coudre à la machine : gwriad gand eur mekanik. coudre une pièce à un pantalon : gwriad eun tamm war eur bragou. coudre avec du fil noir : gwriad gand neud du. apprendre à coudre : deski gwriad. elle ne sait pas coudre : ne oar ked gwriad. une machine à coudre : eur mekanik da wriad. 2) /divers/ un dé à coudre : eur veskenn.
coudrier	1) gwezenn-gelvez f. gwez-kelvez ; gween-gelwe f. gwe-keive 2) kelvez m. ; kelve m. un bâton de coudrier : eur vaz kelvez. un manche de coudrier : eun troad kelvez. une baguette de coudrier : eur wialenn gelvez.
couenne	tonenn f. ; ton
couette	golhed f. golhejou une couette de plumes : eur holhed plu. une couette de balle : eur holhed pell.
couille	kouillenn f. kouillou
couillon	genouaoueg m. genaouaien
coulant	un noeud coulant : eur skoulm red.

couler

1) redeg (red-)

l'eau coule : redeg a ra an dour.

tous les fleuves coulent vers la mer : an oll steriou a red

d'ar mor.

la sueur lui coulait sur le front : redeg a ree ar hwez war e dall.

2) diredeg (dired-)

3) mond (irr.) d'ar strad ; mond (irr.) d'ar foñs

un pétrolier a coulé près d'Ouessant : êd zo eur petrolier d'ar strad tost da enez Eusa.

4) kas (kas-) d'ar strad ; kas (kas-) d'ar foñs ; gweledi (gweled-) ce bateau a été coulé pendant la dernière guerre ; kased eo bed ar vatimant-se d'ar foñs pad ar brezel diweza.

couleur

liou m. -iou

une couleur claire (sombre) : eul liou sklêr (teñval).

il a changé de couleur : chañched e-neus liou.

la couleur du ciel : liou an oabl.

toutes les couleurs de l'arc-en-ciel : kement liou a zo war ar ganevedenn.

il a les cheveux de quelle couleur ? : peseurt liou eo e vleo ?
des vêtements de toutes les couleurs : dillad a beb seurt liou.

couleuvre

aer-rouz f. aered-rouz cf. vipère

coup

1) tñl m. -iou

un coup violent : eun tñl krenn.

un coup terrible : eun tñl spontuz.

un petit coup : eun tñl bihañ.

un bon coup de pied : eur peñz tñl troad.

un mauvais coup : eun tñl fall.

du premier coup : diouz an tñl kenta.

un beau coup : eun tñl kaer.

donner un coup de poing : rei eun tñl dorn.

recevoir un coup : kaoud eun tñl.

rendre coup pour coup : renta tñl evid tñl.

asséner un coup : darhao eun tñl.

porter un coup mortel : rei tñl ar maro.

se battre à coups de bouteille : en em ganna a dñliou boutaill.

il a manqué son coup : c'hwited e-neus e dñl.

elle a réussi son coup : deued eo a-benn deuz he zñl.

un coup de sang : eun tñl gwad.

un coup d'œil : eun tñl lagad.

un coup d'épaule : eun tñl skoaz.

un coup de téléphone : eun tñl telefon.

un coup de couteau : eun tñl kontell.

un coup de corne : eun tñl korn.

un coup de sifflet : eun tñl c'hwitell.

un coup de dent : eun tñl dant.

un coup de froid : eun tñl riou.

sur le coup de midi : d'an tñl a greisteiz.

j'ai un coup de soleil dans le dos : pãkêd meus eun tñl-heol war ma hein.

il en a tué sept d'un coup : lahed e-neus seiz en eun tñl.
il est mort sur le coup : marved eo war an tñl.

2) tenn m. -ou

un coup de fusil : eun tenn fuzuill.

un coup de canon : eun tenn kanol.

un pistolet à deux coups : eur bistolenn a zaou denn.

à coups d'ailes : a denn askell.

3) tarz m. -ou

un coup de tonnerre : eun tarz kurun.

un coup de mer : eun tarz mor.

un coup de vent : eun tarz avel.

4) /divers/

viens boire un coup : deuz da eva eur banne !

tout à coup : greiz toud.

donner des coups de bâton : rei bahadou.

donner des coups de bec : rei begadou.

donner des coups de griffe : rei krabanadou.

donner des coups de patte : rei paoadou.

il a reçu un mauvais coup : bed e-neus eur mestñl.

du même coup : war ar menez tro.

c'est un coup pour rien : eun dro wenn eo.

un coup de vent : eur barr avel.

viens me donner un coup de main : deuz da rei an dorn din.

vous n'êtes pas dans le coup : n'emaoh ked barz ar jeu.

coupable

qui est le coupable ? : piou e-neus grêd an tñl ?

couper

1) troha (troh-)

couper du bois : troha koad.

couper du blé : troha ed.

il s'est fait couper les cheveux : lakêd e-neus troha e vleo.

couper un bout de ficelle : troha eun tamm fiseñl.

on lui a coupé la jambe : trohed eo bed e harr.

couper une haie : troha eur harz.

couper du pain : troha bara.

couper de la viande : troha kig.

on lui coupera la tête : trohed e vo e benn dezañ.

couper le cou à un poulet : troha he gouzoug d'eur yar.

je vais te couper les oreilles ! : me a droho da ziouskouarn dit !

vous nous coupez toujours la parole ! : atao e vezit o troha ar

gñz deom !

couper et donner les cartes : troha hag ober dorn.

couper court : troha berr.

il coupe bien : troha mad a ra.

couper droit : troha eeun.

couper en biais : troha a-viez.

couper de travers : troha a-dreuz.

couper en long : troha a hed.

couper en deux : troha e daou hanter.

couper en quatre : troha e kroaz.

couper en petits morceaux : troha e tammou bihan.
 couper avec un couteau : troha gand eur gontell.
 ça coupe comme un rasoir : troha a ra vel eun ôtenn.
 couper du papier avec des ciseaux : troha paper gand eur zizaill.
 couper un arbre avec une hache : troha eur wezenn gand eur vouhal.
 couper de l'herbe à la faucille : troha geot gand eur 'falz.

2) /divers/
 il ne faut pas couper les griffes d'un chat : arabad eo krenna e ivinou d'eur haz.
 cette nouvelle m'a coupé l'appétit : ar helou-ze neus torred ar c'hoant dibri din.
 couper un arbre : diskar eur wezenn.
 du vin coupé d'eau : gwîn mesked gand dour.
 un camion nous a coupé la route : eur hamion e-neus stanked an hent dirazom.
 ma faux ne coupe pas : n'eo ked lemm ma 'falz.

coupeur troher m. -ien
coupeuse troherez f. -ed
couple 1) /féminin/ koublad m. -ou cf. paire
 2) /masculin/
 un couple de jeunes mariés : daou zen nevez dimezed.
 un vieux couple : eur pôtr koz hag e bried
 eur vaouez koz hag he 'fried.
couplet koublad m. -ou
 j'ai oublié le dernier couplet : ankoueed meus ar houblad diweza.
coupure troh m. -iou
 une coupure profonde : eun troh don.
 il a une coupure au doigt : eun troh e-neus en e viz.
cour 1) porz m. -iou
 une cour fermée : eur porz kloz.
 au fond de la cour : e traoñ ar porz.
 au milieu de la cour : e kreiz ar porz.
 une cour d'école : eur porz-skol.
 les enfants jouent dans la cour : ma ar vugale o hoari barz ar porz.
 la porte de la cour : dor ar porz ; an nor-borz.
 les fenêtres donnent sur la cour : digori a ra ar prenechou war ar porz.
 balayer la cour : skuba ar porz.
 elle a traversé la cour en courant : treuzed he-deus ar porz en eur redeg.

2) lez f.
 la cour de justice : al lez varn.
 la cour du roi : lez ar Roue.
 faire la cour aux filles : ober al lez d'ar merhed.

courage kouraj f. ; kalon f.
 un grand courage : eur gouraj vraz.
 ils se sont battus avec beaucoup de courage : nem ganned int gand kalz a gouraj.
 perdre courage : koll kouraj.
 reprendre courage : kemer kouraj.
 il manque de courage : mankoued a ra a gouraj.

courageux kourajuz ; kaloneg
 il a fallu qu'elle soit courageuse : red eo bed dezi beza kourajuz.
 il n'est pas très courageux : n'eo ked re gourajuz.

courant suivre le courant : mond gand an dour.
 remonter le courant : mond eneb an dour red.
 ils ont été emportés par le courant : kased int bed gand an dour.
 ici, le courant est violent : amañ zo eur gas spontuz.
 ne restez pas dans le courant d'air : ne chomit ked barz ar gas.

courbatu breved
 je suis tout courbatu : breved oll on.

courber plega (pleg-) cf. plier, pencher

coureur 1) reder m. -ien
 c'est un bon coureur : eur reder mad eo.
 2) merhetêr m. -ien ; plahetêr f. -ien /de filles/

courir 1) redeg (red-) ; galoupad (galoup-)
 courir vite : redeg buan.
 il court comme un lièvre : redeg a ra vel eur had.
 ils couraient à perdre haleine : redeg a reent ken ha ken.
 elle y est allée en courant : Ûd eo di en eur redeg.
 le chien court après le chat : redeg a ra ar hi war lersh ar haz.
 faire courir des bruits : lakad brujou da redeg.
 courir le pays : redeg bro.
 courir les filles : redeg war lersh ar merhed.

2) /divers/
 on a fait courir le bruit de son mariage : kased eo bed ar vrud e oa dimezed.
 il est parti courir les filles : Ûd eo da verheta.

couronne kurunenn f. -ou
 la couronne du roi : kurunenn ar roue.
 une couronne de roses : eur gurunenn roz.
 une couronne d'épines : eur gurunenn spern.

couronner	kuruni (kurun-) ; kurunenni (kurunenn-)
courrier	il y a longtemps que je n'ai pas reçu de courrier : pell zo meus ked bed netra gand ar fakteur.
courroie	koreenn f. -ou ; lerenn f. -ou la courroie de la batteuse a sauté : lammed eo lerenn an dornerez.
cours	1) kentel f. -iou /leçon/ un cours d'histoire : eur gentel istor. il suit des cours de breton : heulia a ra kenteliou brezoneg. je n'ai pas bien suivi le cours : meus ked chilaoued mad ar gentel. 2) /divers/ le cours du blé : priz an ed. au cours de sa vie : pad e vuhez. en cours de route : en eur vond.
course	1) redadeg m. -ou /compétition/ une course de chevaux : eur redadeg kezeg. 2) redadenn f. ce cheval a fait une longue course, donnez-lui à boire : ar marh-mañ neus grêd eur redadenn hir, roit dour dezah. 3) red m. aller à la course : mond d'ar red. un cheval de course : eur marh red. 4) /divers/ des chevaux de course : kezeg kours. aller faire ses courses : mond d'ober e gomisionou. la course du soleil : tro an heol.
court	berr il a les cheveux courts : bleo berr neus. ta robe est trop courte : ne verr eo da robenn. ce chemin est plus court que l'autre : berroh eo an hent-mañ vid egile. elle a les jambes courtes : diouharr berr he-deus. j'ai trouvé le temps court : berr meus kaved an amzer. la vie est courte : berr eo ar vuhez. un court moment : eur pennad berr. j'ai le souffle court : berr eo warnon. couper au plus court : troha berr. je suis à court d'argent : berr eo an arhant ganin.
courtill	l'orz f. -ou
cousin	kenderv m. kendirvi ; kouzin m. -ed des cousins germains : kendirvi gompez. cousins issus de germains : bugale kendirvi.

cousine	keniterv f. kenitervezed ; kentervez f. -ed ; kouzinez f. -ed
coussin	torchenn f. -ou
coût	priz m. priziou cf. prix le coût de la vie : priz an traou.
couteau	kontell f. -ou ; koutell f. koutilli un grand (petit) couteau : eur gontell vraz (vihan) un couteau qui coupe bien : eur gontell lemm. un couteau qui coupe mal : eur gontell dall. un couteau pointu : eur gontell veged. un couteau rouillé : eur gontell nevez (goz). un couteau neuf (vieux) : eur gontell nevez (goz). acheter un couteau : prena eur gontell. avoir perdu mon couteau : kollid meus ma hontell. j'ai perdu mon couteau : kollid meus ma hontell. affuter son couteau : lemma e gontell. ouvrir (plier) son couteau : digori (plega) e gontell. sortir son couteau de sa poche : tenna e gontell miz deuz e godell. mettre son couteau dans sa poche : lakad e gontell barz e godell. prête-moi ton couteau : prest da gontell din. coupe la corde avec ton couteau : troh ar gordenn gand da gontell. un couteau de boucher : eur gontell giger. le manche du couteau : troad ar gontell. la lame du couteau : laonenn ar gontell. donner un coup de couteau : rei eun töl kontell.
coûter	1) kousta (koust-) cette casserole m'a coûté 100 francs, mais elle ne les vaut pas : ar gastolorenn-ze he-deus kousted kant lur din, med ne dalv ked kement-se. combien ça coûte ? : pegement e koust an dra-ze ? la viande coûte cher : ker e koust ar hig. coûte que coûte : kousto pe gousto. ça ne coûte rien d'aller lui demander : ne goust ked ker mond da houlen digantañ. 2) /divers/ ça me coûterait d'aller lui demander pardon : d'fez e havfen mond da houlen pardon digantañ. ça va te coûter cher ! : me hen talvezo dit !
coûteux	koustuz.
coutil	koutill m.
coutre	kontell f. -ou ; koutell f. koutilli le coutre de la charrue : kontell ar brabant.
coutume	1) giz f. -iou les coutumes locales : giziou ar vro. les vieilles coutumes se perdent : mond a ra ar giziou koz da goll. selon la coutume : hervez ar hiz.

2) kustum m.
comme de coutume : vel kustum.

couture 1) /technique/ cf. coudre
où avez-vous appris la couture ? : peleh peus desked gwriad ?
2) gwri m. -ou ; gri m. -ou
faire une couture : ober eur gwri.
la couture n'a pas tenu : neus ked dalhed ar gwri.

couturière kemenez f. -ed
une bonne couturière : eur gemenez vad.

couvée gorad m. -ou
ces 15 poussins sont de la même couvée : ar pemzeg labous bihan-ze zo diwar ar memez gorad.

couvent kouent f. kouenchou
la supérieure du couvent : prioiez ar gouent.

couver gori (gor-)
la poule couve : ma ar yar o hori.

couvercle golo m. goleier ; goulher m. -iou
le couvercle de la casserole : golo ar gastolorenn.
le couvercle de la boîte : golo ar voest.
le couvercle du pot : golo ar pod.
mettre (enlever) le couvercle : lakad (tenna) ar golo.

couvert 1) /nom/
mets le couvert : lak an traou war an dól.
le gîte et le couvert : ar boued hag al lojeiz.
2) /adj./
le temps est couvert : goloed eo an amzer.

couverture 1) pallenn f. -ou ; tapis m. -ou
une couverture en laine : eur ballen hloan.
2) golo m. -iou
il a déchiré la couverture de son livre : roged neus golo e leor.

couveuse gorerez f. -ed
c'est une bonne couveuse : eur gorerez vad eo.

couvreur toer m. -ien
mais : une échelle de couvreur : eur skeul-do.
un marteau de couvreur : eur morzól-to

couvrir 1) goloï (golo-) ; golei (golo-)
la terre est couverte de neige : goloed eo an douar gandan erh.
2) /divers/
sa chemise est couverte de sang : leun eo e roched a wad.
3) toi (to-) ; tei (to-)
couvrir une maison d'ardoises : toi eun ti gand mèn glaz.
4) /une femelle/ sailla (saill-)
le taureau a couvert la vache : sailled eo bed ar vuoh gand an taro.

couvrir (se) couvrez-vous bien, il fait froid ! : lakit dillad tomm, yen eo !
se couvrir les yeux : moucha e zaoulagad.
couvrez-vous : lakit ho tok.
le temps se couvre : tevallaad a ra an amzer.

crabe 1) krank m. -ed
faire cuire un crabe : lakad eur hrank da bozad.
éplucher un crabe : dispenn eur hrank.
manger du crabe : debri kranked ; debri eur hrank.
la carapace du crabe : krogen ar hrank.
les pinces du crabe : bizied ar hrank.
2) /divers/
aller pêcher des crabes : mond da granketa.

crachat krañch m. ; krach m. ; skop m.

cracher krañchad (krañch-) ; krachad (krach-) ; skopad (skop-) ; tufad (tuf-)
ne crachez pas par terre ! : na grañchit ked war an douar.

craie krê m.
un morceau de craie : eun tanm krê.

craindre cf. peur, trembler
avec mon fusil, je ne crains rien : gand ma fuzuill, n'am-mez aon rag tra bed.
cet enfant ne craint personne : ar bugel-ze ne gren dirag den bed.
les géraniums craignent le froid : ar jeraniom ne blij ked an amzer yen dezo.

crainte aon f. cf. peur

crainitif aonig cf. peureux

crampe skoulm m. -ou
j'ai une crampe au pied : eur skoulm meus barz ma zroad.

cran les crans de la crémaillère : drein ar vaz-drezenn.

crâne	1) klopenn m. /ossements/ on a trouvé des crânes humains dans l'ancien ossuaire : kaved zo bed klopennou tud barz ar charnel goz. 2) penn m. -ou un crâne chauve : eur penn moal. la hache lui a fendu le crâne : faouted eo bed e benn gand ar vouhal.
crapaud	touseg m. -ed ; -i
craquelé	la terre est craquelée : kraz eo an douar.
craquement	strakadenn f. -ou la nuit on entend des craquements : pad an noz e vez kleved strakadennou.
craquer	1) strakal (strak-) le bois mort craque sous les pieds : strakal a ra ar heuneud pa gerzer warno. 2) cf. casser.
crasse	kramenn f. kramm son cou est couvert de crasse : eur gramenn zo war e houzoug.
cravate	kravatenn f. -ou
crayon	kreion m. -ou un crayon noir (de couleur) : eur hreion du (liou). tailler un crayon : tailla eur hreion.
créateur	krouer m. /rel./ Dieu, créateur du ciel et de la terre : Doue, krouer an douar hag an neñv.
création	kreasion f. /rel./ la création du monde : kreasion ar bed. mais : avant la création du monde : rög m'oa bed kroued ar bed.
crèche	kraou m. krevier ; kreier /cf. étable, écurie, porcherie/
crédit	gle m. ; dle m. acheter à crédit : prena war gle.
créer	kroui (krou-) /rel./
crémaillère	drezenn-bod f. ; baz-drezenn f. le chaudron est suspendu à la crémaillère : ma ar gôter a-istribill ouz an drezenn-bod.

crème	1) dien m. ; koavenn m. /du lait/ battre la crème : meska an dien. je n'aime pas la crème : ne blij ked an dien din. 2) krem m. /pharmacie/
crêpe	1) krampouezenn f. krampouez ; krampoueenn f. krampouez des crêpes sucrées (salées) : krampouez dous (sall). des crêpes de froment (de blé noir) : krampouez gwiniz (ed du). des crêpes fines (épaisses) : krampouez fin (teo). faire ces crêpes : ober krampouez. manger des crêpes : debri krampouez. mettre du beurre sur les crêpes : larda amann war ar hrampouez. 2) krep m. /tissu/
crépiter	strakal (strak-) le feu crépite : strakal a ra an tan.
crépuscule	serr-noz m. au crépuscule : da zerr-noz.
cresson	beler m.
crête	kribenn f. -ou la crête du coq : kribenn ar hog.
creuser	toulla (toull-) creuser une tombe : toulla eur bez. creuser un puits : toulla eur puñs.
creux	/nom/ toull m. -ou cf. trou mais : boire dans le creux de sa main : eva en e voz.
creux	1) /adj./ kleuz ; kreuz un arbre creux : eur wezenn-gleuz. 2) /divers/ j'ai une dent creuse : eun toull zo barz ma dant. un chemin creux : eun hent don. une assiette creuse : eun asted don.
crevasse	1) skalf m. -ou ; skar m. -ou /peau/ 2) faout m. -ou /maçonnerie/
crevassé	1) skalfed ; skared /peau/ elle a les mains crevassées : skalfed eo he daouarn. 2) faouted /maçonnerie/ le mur est crevassé : faouted eo ar voger.

- crevasser (se) 1) dond da skalfa (skalf-) ; dond da skara (skar-) /peau/
2) dond da 'faouta (faout-) /maçonnerie/
- crève-cœur kalonad f.
la mort de son petit chien a été un crève-cœur pour lui : maro e gi bihan zo bed eur galonad 'vitañ.
- crevé 1) maro ; kreved /animaux/
un chien crevé : eur hi maro ; eur hi kreved.
2) kreved /objets gonflés/
un pneu crevé : eur pneu kreved.
la balle est crevée : kreved eo ar bolotenn.
- crever kreuvi (kreuv-)
sa vache a crevé : kreved eo e vuoh.
- crevette chevretezen f. (chevretes)
mais : pêcher des crevettes : chevretesa (chevretes-)
- cri kriadenn f. -ou
pousser un cri : lōskel eur griadenn.
un cri aigu : eur griadenn skiltr.
- crible krouer m. -iou ; kreur m. -iou
- criée kohi m. ; kohu m.
j'ai acheté du poisson à la criée : prened meus pesked barz ar hohi.
- crier krial (kri-)
crier à tue-tête : krial a bouez penn.
je lui ai crié de venir : kried meus warnañ dond.
j'entends les enfants crier dans la cour : kleved a ran ar vugale o krial barz ar porz.
- crieur le crieur public : an embanner.
- crime krim m. -cu ; torfed m. torfejou
- crin reunenn f. reun
du crin de cheval : reun marh.
coudre avec un crin : gwriad gand eur reunenn.
- crinière moue f. -cu

- crise 1) krizenn f. -ou /maladie/
il a souvent des crises : altez e-nez krizennou.
2) la crise économique : ar hriz.
3) barr m. -ou cf. accès
une crise de larmes : eur barr gouela.
- cristal kristal m.
- croasser koagal (koag-)
les corbeaux croassent : koagal a ra ar brini.
- croc 1) krog m. krigi
un croc à fumer : eur hrog teil.
arracher des pommes de terre avec un croc : tenna avalou-douar gand eur hrog.
2) les crocs du chien : dent ar hi.
3) un croc-en-jambe : eun tōl biz troad.
- crochet 1) krog m. krigi
la viande est pendue au crochet : ma ar hig ouz ar hrog.
2) kroched m. -ou /vêtements/
- crochu kamm
un nez crochu : eur fri kamm.
- crocodile krokodil m. -ed
- croire 1) kredi (kred-)
il croit tout ce qu'on lui dit : kredi a ra kement a vez lavared dezañ.
je ne crois pas que ce soit vrai : ne gredan ked e vefe gwir.
J'ai de la peine à le croire : poan am-eus o kredi an dra-ze.
n'allez pas croire cela : n'it ked da gredi ze.
à ce que je crois : hervez a gredan.
on lui a fait croire qu'il était malade : roed zo bed dezañ da gredi e oa klañv.
Je vous crois : kredi a ran ahanoh.
elle croit en Dieu : kredi a ra a zo eun Doue.
c'est à croire qu'il ne sait pas lire ! : da gredi zo ne oar ked lenn !
2) kavoud (kav-) da
je ne crois pas qu'il viendra : ne gav ked din e teufe.
je crois bien qu'il est mort : me a gav din eh eo maro.
croyez-vous que ce soit vrai ? : kavoud a ra deoh eh eo gwir ?
- croisement kroaz-hent /routes/ cf. carrefour

croiser	1) kroaza (kroaz-) ; kroazia (kroazi-) croisez les bras ! : kroazit ho tivreh ! 2) lakad (lak-) e kroaz croiser deux bâtons : lakad diou vaz e kroaz.
croissance	kresk m. la croissance d'un arbre : kresk eur wezerin.
croissant	le croissant de la lune : al loar gorneg.
croître	kreski (kresk-) cf. grandir, pousser.
croix	kroaz f. -iou une croix d'argent : eur groaz argant ; eur groaz arhant. une croix de bois : eur groaz koad. une croix de pierre : eur groaz vèh. faire le signe de la croix : ober sin ar groaz. mettre les bras en croix : lakad e zivreh e kroaz.
croquer	croquer une pomme : chaokad eun aval cf. mâcher, manger, mordre.
crosse	1) kros m. -ou la crosse du fusil : kros ar fuzuill. 2) la crosse de l'évêque : gwalenn an eskob.
crotte	1) fank m. /boue/ son pantalon est plein de crotte : e vragou zo fank-toud. 2) kôh m. /excrément/ ; kaoh m. de la crotte de chien : kôh ki. des crottes de mouche : kôh kelien.
crottin	kôh kezeg mais : ramasser du crottin de cheval : kôhkezeta.
croup	kroup f. il est mort du croup : marved e oa gand ar group.
croupe	talier m. la croupe du cheval : talier ar marh.
croupière	kulier m.
croupi	de l'eau croupie : dour chag.
croûte	1) kreunen f. kreun des croûtes de pain : kreun bara. 2) trouskenn f. trousk la croûte d'une plaie : trouskenn eur gouli.

croûton	boulh bara manger un croûton : debri eun tamm boulh bara.
croyable	kredabl ce n'est pas croyable ! : n'eo ked kredabl !
croyance	kredenn f. -ou les anciennes croyances : ar hredennou koz.
cru	kriz ; kri de la viande crue : kig kriz. manger des coques crues : debri kokouz en kriz (ez kriz). je vais te manger tout cru : debri a rin ahanout en kriz.
cruauté	krizder m.
cruche	1) pod m. -ou une cruche à eau : eur pod dour. 2) podad m. -ou une cruche de vin : eur podad gwin.
crucifier	krusifia (krusifi-)
crucifix	kroaz f. -iou ; krusifi f. -ou
crue	kresk m. la crue des eaux : kresk an dour.
cruel	kriz ; kri un homme cruel : eun den kriz.
cueillir	dastum (dastum-) cueillir des fleurs : dastum fleur. mais : cueillir des mûres : mouara.
cuillère	loa f. -iou une petite cuillère : eul loa vihan. une cuillère en argent (en bois) : eul loa arhant (goad). manger sa soupe avec une cuillère : debri e zoubenn gand eul loa. le manche de la cuillère : troad al loa.
cuir	ler m. un morceau de cuir épais : eun tamm ler teo. des chaussures en cuir : botou ler.
cuire	poaza (poaz-) ; poahad (poah-) cuire des pommes de terre : poaza avalou-douar. cuire de la viande : poaza kig.

cuire des légumes : poaza legumach.
 cuire au four : poaza barz ar 'forn.
 cuire au grill : poaza war ar hrill.
 cuire à la broche : poaza ouz ar ber.
 cuire à la casserole : poaza barz eur gastolorenn.
 cuire au beurre : poaza war an amann.

cuit	poaz ; poah c'est trop cuit : re boaz eo. la viande n'est pas assez cuite : n'eo ked poaz a-walh ar hig.
cuisine	1) kegin f. /restaurants, châteaux, etc./ 2) kuizin f. /maisons récentes/
cuisinier	keginer m. -ien
cuisinière	keginerez f. -ed
cuisse	morzed f. diouvorzed /paire/ ; morzedou des grosses cuisses (maigres) : diouvorzed teo (treud).
cuivre	kouevr m. ; keor m. un morceau de cuivre : eun tamm kouevr. du fil de cuivre : orjal kouevr.
cul	reor m. -iou ; revr m. -iou tomber sur le cul : koueza war e reor. il a reçu un coup de pied au cul : bed e-neus eun töl troad en e reor. le trou du cul : toull ar reor. le cul de la bouteille : reor ar voutaill.
culotte	bragou m. brageier
cultivateur	labourer-douar m. labourerien-douar
cultivatrice	labourez-douar f. labourerezed-douar
cultiver	1) labourad (labour-) cultiver la terre : labourad an douar. il cultive son champ : labourad a ra e bark. 2) ober (gra-) on cultive beaucoup de blé par ici : dre amañ e vez grêd kalz a ed.
cu'ure	1) labour-douar f. la culture manque de bras : al labour-douar a vank divrehiou dezi. 2) /dive-s/ la culture du lin était très répandue autrefois : gwechall e veze grêd kalz a lîn.

curé	person m. -ed cf. recteur.
curer	skarza (skarz-) ; karza (karz-) curer les fossés : skarza ar foziou.
curieux	kuriuz une petite fille curieuse : eur plah vihan guriuz.
cuve	beol f. -iou
cygne	sign m. -ed blanc comme un cygne : gwenn-sign.

VOLUMES PARUS

- Studi n° 1 - F. Broudic : Roll al leoriou hag ar pennadou bet embannet e brezoneg e 1973. (Bibliographie des publications en langue Bretonne, année 1973) 114p..... EPUISE
- Studi n° 2 - J. Le Dû et Y. Le Berre : Roue ar Portugal. - 79p. Edition pédagogique, sous la forme d'un livre - cahier d'un conte populaire recueilli par Luzel. Le texte est accompagné d'un appareil critique (biographie de Luzel, bibliographie, composition, analyse, essai d'interprétation) et pédagogique (vocabulaire nouveau question, exercices structuraux...) sur bande magnétique (conte et exercices : 30 F), film fixe de dessins (20 F)..... 12,00 F
- Studi n° 3 - Bernard Tanguy : Les noms de lieux bretons, tome I : Toponymie descriptive - 134 p. Manuel d'initiation à la compréhension des noms de lieux : 450 termes utilisés, 3000 toponymes cités (milieu géographique, végétal, animal)..... EPUISE
- Studi n° 4 - J. Le Dû, Y. Le Berre : nouveau dictionnaire pratique français-breton, (tome 1) : lettres A-B (bêcher). 87p. Dictionnaire de la langue usuelle parlée, contenant de nombreux exemples..... EPUISE
- Studi n° 5 - F. Broudic : Roll al leoriou hag ar pennadou bet embannet e brezoneg e 1974 - (Bibliographie des publications en langue bretonne, année 1974) 136p. 12,00 F
- Studi n° 6 - Jakez Riou - An ti satanazed (la maison hantée) 93 p Texte breton du roman, avec introduction biographique, bibliographique et étude linguistique et littéraire de l'ouvrage EPUISE
- Studi n° 7 - J. Le Dû, Y. Le Berre : nouveau dictionnaire pratique français-breton (tome 2) : lettres B-C (Becquée - Chancelant). - p. 86 - 168..... 10,00 F
- Studi n° 8 - F. Cal'hun : les brigines de la langue bretonne. première partie : Argumentation historique..... 12,00 F
- Studi n° 9 - Y. Méssec : Eur veaj e Stadoù-Unanet an Amerif. Récit écrit dans un breton simple et vivant du voyage fait par l'auteur aux U.S.A. en 1976 - 138p..... EPUISE
- Studi n° 10 - F. Broudic : Roll al leoriou hag pennadou bet embannet e brezoneg e 1975 (bibliographie des publications en langue bretonne : année 1975)..... 15,00 F
- Studi n° 11 - Yves-Goulven Morvan : textes choisis dans "Feiz ha Breiz" - présentés par J. Le Dû et Y. Le Berre.... 15,00 F

RESUME A PARAITRE 1979

- Studi n° 13 - H. LI. Humphreys : la langue galloise - présentation générale.



STUDI - BON DE COMMANDE

Nom Qualité

Adresse de l'établissement

Code postal Ville

- s'abonne

- desire recevoir exemplaire(s) du n°

(tarifs : voir ci-dessus)

PIECE DE PAIEMENT JOINTE :

- Un chèque bancaire
- Un chèque de virement postal avec ses 3 volets
- Un mandat postal

Date : Signature :

NOTA : Les chèques doivent être libellés au nom de :
Monsieur l'Agent Comptable du C.R.D.P.
de RENNES
C.C.P. 9404-75 C - RENNES
Expédier le chèque et le bon de commande à
Monsieur le Directeur du C.R.D.P. de
RENNES
92, rue d'Antrain - 35003 RENNES Cédex

N.B. « La production de mémoires ou de factures pour le paiement des travaux ou fournitures effectués pour le compte de l'Etat des départements, des communes et des établissements publics n'est pas exigible pour les dépenses qui n'excèdent pas 50 Francs dans leur totalité ».

(article premier du décret n° 50 137 du 19.1.1950)

J. LE DU - Y. LE BERRE
STUDI n° 12 - JUILLET 1979

IMPRIME PAR LE C.R.D.P. DE RENNES
92, rue d'Antrain
DEPOT LEGAL 3ème TRIMESTRE 1979

B 250